



Kamp Etrekeltiek Ar Vrezhonegerion

Logivi Plougras (28 gouere-13 eost 1966)

Kentelioù ar Rummad Uhel gant

**ABENNEZ MARI ELEN MAZE GAB
CHEREL RONAN JOLAIS GWERNEGAN
YEUN GOURVES TANGI LOUARN**

kelennerion Strollad an Deskadurezh Eil Derez

PREDER

Kaier 88-90

Here-Du-Kerzu 1966

Kamp Etrekeltiek Ar Vrezhonegerion

Logivi Plougras (28 gouere-13 eost 1966)

Kentelioù ar Rummad Uhel gant

**ABENNEZ MARI ELEN MAZE GAB
CHEREL RONAN JOLAIS GWERNEGAN
YEUN GOURVES TANGI LOUARN**

kelennerion Strollad an Deskadurezh Eil Derez

PREDER

Kaier 88-90

Here-Du-Kerzu 1966

Roll ar c'hentelioù displeget e LOGIVI-PLUGRAZ da gelfver KAMP ETREKELTIK
AR VREZHONERGERION 1966 - Rumad Uhel e kefridi Kelennerion S.A.D.E.D.

- * 29 07 66 Lennegezh
BARZHONIEZH ROPPRZH AR MASON, gant abENNEZ
- * 30 07 66 Istor
AN EMSAV SEVENADUREL ABADE AN EIL BREZEL-BED, gant Mari-Elen MAZE
- 01 08 66 Lennegezh
DIVI-KENAN KONGAR, gant Gi KREAC'H
- 02 08 66 Jedoniezh
LAKADENN EUKLIDES, gant Anna PALARIC
- 03 08 66 Istor
AN EMSAV E 1945-46, gant Youenn OLIER
- * 04 08 66 Lennegezh
GWERZAQUEREZH MAOZEZ GLANNDOUR, gant Gab CHEREL
- * 05 08 66 Istor
BREZEL DIABARZH IWERZHON, gant Ronan JOLAIS
- * 06 08 66 Istor
AN DAREMPREDOU ETRE AN ESKIBION HAG AN EMSAV ABADE 1920, gant GWERNEGAN
- * 08 08 66 Istor
KUZUL BROADDEL BREIZH, DISKLERIADUR PONDIVI, gant Yaou GOURVES
- * 09 08 66 Lennegezh
MEAVENN, gant Tangi LOUARN
- 10 08 66 Yezhadur
AR FURM "ZD", gant Ronan AR GLEW
- 11 08 66 Istor
AR VUHEZ POLITIKEL E BREIZH ABADE AN EIL BREZEL-BED, gant Marsel POULAIN
- 12 08 66 Douaroniezh
LABOUR MAD-TSE-TOUNG EVIT DIORREN ARMERZH SINA, gant Gwenael MAZE
- * 13 08 66 Lennegezh
ANKEN AN NIBELUNGEN : Y.V. HENEU, gant abENNEZ

o o

Ar c'hentelioù merket * eo ar re a gaver embannet ar c'haier-mañ.

o

C

K.E.A.V. evit an holl gentelioù, war un dro gant hec'h aozer
evit pep hini anezho, eleze : abENNEZ, M.E. MAZE, G. CHEREL,
Y. GOURVES, R. JOLAIS, GWERNEGAN, T. LOUARN.

Gwener 29 Gouhere 1966

L E N N E G E Z H

a b E N N E Z

B A R Z H O N I E Z H R O P E R Z H A R M A S O N

Un dlead eo din e gwirionez reiñ da anavezout gwelloc'h abostol ar brezhoneg peurunvan ha gwenedour evel don, Roperzh ar MASON, nebeutoc'h anavezet gant e anv-barzh abHerri. Gwir eo n'eus bet embannet met ul levr digantañ e brezhoneg peurunvan, Dvit ket ha netra. Un druez eo e vefe aet re abred gant an Ankou, anez hor bije bet moarvat oberennoù all talvoudusoc'h marteze, evel an Dastumadoù Barzhonegoù manet e darn (Bourbl ar Reklom(1) ha Skeul Jakob). N'en deus embannet a-hend-all met un dastumad barzhonegoù, e rannyezh Wened : Chal ha Dichel, hag un nebeut barzhonegoù all ha danevelloù e Dihunemb. Diouz ar gelaouenn-se e tennomp ar varzhoneg a studiimp pelloc'h. Un nebeut pezhioù diwar e zorn zo bet embannet war Al Liamm hag an niverenn 31 zo bet gouestlet dezhañ.

Gwenedour e oa Roperzh ar MASON . Ganet e oa en Oriant,

abErrez

d'ar 7 Ebrel 1900.

"E dad a oa ofisour en Trevedennoù. E dad kozh, anezhañ ul labourer-douar, a voe maer Sant-Generi. E c'hourdadoù, labourerion-douar eus kornad Pontivi, a oa Chouamed en o zouesk. Skoliet eo bet Roperzh ar MASON e lise an Oriant. Aet eo da c'houde d'ar Skol Politeknik, e Paris, ha deuet eo da vout ofisour a vor." (Istor Lennegezh...)

Roperzh ar MASON ne oa ket brezhoneger a-vihanik. Diwezhat a-walc'h eo en em lakaet da zeskiñ hon yezh, o teraouiñ gant rannyezh e c'hourdadoù, ar gwenedeg. Komprenadus e c'helle c'hoazh bout kement-mañ d'ur mare ma veze peuzvrezhonek hon maeziou. Kembraeg en devoa desket ivez ha savet zoken ur geriadur brezhonek-kembraek, chomet diembann.

"Dedennus-tre eo ar skrivagner-mañ, anezhañ un den a vor, boas ouzh dremmwelioù lies-doare ar broioù pell, ha chomet stag daoust pe en abeg da se ouzh e vro c'henidik, ur barzh leun a azaouez evit an awen, un daneveller eeun ha fromus, ur prederour start en e feiz kristen." (Istor Lennegezh...)

o

(1) Bourbl ar Reklom : Trouz kreñv ha dispis ar barred-avel.

T a n g w a l l

Dihunet on e kreiz an noz
Gant mouezh an ael,
Perak e torrez ma repoz
O breur teñval ?

Met ne glevan respont ebet
Ha setu spis
Neuz un den e vlev hir ha louet,
E zremm iskis.

Un tal uhel, daoulaged sklær
Gant selloù berv
Ha diweuz moan lec'h ma lenner
Ur gwenn'hoarzh c'hwerv !

Taolet en deus gerioù neuze
Leun a gomar,
Komzou a feiz, a nerzh ivez
D'ar re c'hoular.

En un taol em eus anzavet
Ar gwir loman,
Prederour meur ar Vrezhoneg,
Fur Keroman !

Tro-war-dro ec'h weler bremañ
Ur yoc'h a dud
Un engroez a gresk diehan,
Souezhet ha mut....

Mouezh Helaou, evel ar gurun,
A sav arre
Ha tamalloù stank a zibun
Hep digarez.

Enep da eneoù peurvat
Ne reont met goap
A bep mennoz kreñv, a bep kad,
A bep dibab !

Enep da gristeniezh hiron
Tud dislivet
Sed ar mestr a skarz al laeron
Ag an Neved !

A-us d'ar gompezenn unton
Lec'h ma ruzer,
Ar menez a zigor ec'hon
Gwel an erer !

Dreist pobloù sanket en arvar
O feiz mouget,
Dreist krederien laosk ha goular
Tan ar spered !

Allas ne glevan den erbet
O respontañ
Hag ar prederour a zo aet
Sammet e gain.

Henn gout a ran, ne oa met un hune !
Dihunet on bremañ e gwirionez
Gant c'hwitelloù spontus ar c'horn brezel,
An Ankou a nij e neñv Breizh-Izel !

Henozh emañ ruz hanter an dremmwel
Du-hont war ma c'her c'henedel.
An tan ne c'helle ket kregiñ er c'halonoù,
Emañ o leskiñ tiez ha maeziou !

A-us d'ar flammoù em led ar maged,
Fifvus ha teñval 'vel naeron koulmet,
Disac'hañ a ra gant klemmoù ifern
Danvez ha frammoù, holl, kig hag eskern !

An oaledoù paour ha pinvik meurbet
Mesk ouzh mesk a zo deuet da vout ludu,
Filh ha seiz hiziv zo hañval-pakret
'Vel an eneoù rak an hini du.

Ne welin ket mui straedoù ker ma bro,
Lec'h ma oa chomet ma eñvor krouadur
Razh an dud a dec'h. Ne sailh tro-war-dro
Nemet an tan-gwall hag al loskadur !

Kalet eo bet ho torn, Aotrou !
Man emañ bremañ Brizeug ha Simon
Ha Masse ha Biseon,
'Barzh ar wrez ruz ?

Meulet e voent gant an Oriant,
N'he deus ankouast met ar Fur,
Ha setu deuet ar freuzhadur
Hag an dismantr !

Ouzh e vouezh veur chomet eo bou(z)ar,
O klask hepken madoù an douar.
N'he deus gortozet met ar Saez.
Deuet eo en noz !

O Doue reizh, koulskoude,
C'hwï hoc'h eus bet truez...

Ya. Gwelet em eus, pell ac'hanemañ,
Kousket da viken e didrouz ar bez
Meur a ger ivez :
Unan oa losket gant ur menez tan,
Un all oa debret gant koadecier gouez,
Ha div, ken spontus o diskar,
Ma n'eus mui anad anezhe
E gouelec'hioù Mor an Tardouar.

Du-kont ar vein kozh a oa mut,
Man emañ saverion Anghor ?
Amañ nend eo ket marv an dud,
Evel e Sodom ha Gomor.

Un deiz ar peoc'h a vo
War roudoù ar gêr-mañ
Ha ni hec'h adsavo,
Nevez ha glan,
En-dro da Gêroman !

Roperzh ar MASON
Gwened, Genver 1943

(Embannet war Dihunamb, niv. 393, p. 73
Mae 1944, e brezhoneg peurunvan dre vras)

o o o

GERIOU :

Rouez eo ar gerioù gwenedek diaes er pennad-mañ :

gwennc'hoarzh : mousc'hoarzh, minc'hoarzh.

yoc'h : bern

arre : furn arveret e BrE. evit adarre; meneget gant Fleuriot
er ger hBr. ari, an henstumm anezhañ moarvat.

hune : hunvre : daoust hag-eñ ez eo un distummedur eus hunvre
pe ur ger all, n'oufen ket lavarout; e kornioù zo avat e reer
gant /hyn/ ha /hynvre/ war un dro.

henozh : skrivet henoazh (BrE. /henoah/ ha /(h)ipax/), dis-
heñvel diouz fenoz.

koulmet : furn hep "s" eus skoulmet. Meur a c'her a gaver

stummet gant un "s" evel-se : temañ/stemañ - karzhañ/skarzhañ..

pinvik : /pin'vi : G/ amañ hon eus miret ar stumm emguzhet rannyezhel, evit ezhommoù ar werzenn. Pinvidik an hini eo.

hañval-pakret : un doareadur kreñvaat da hañval (pe heñvel), en arver e BrE. Lavarout a reer ivez : hañval-bras, hañval-kaer, hañval-groñs, hañval-fasipl, hañval-petu, gant arlivioù spis pe spisoc'h. Galliek pe romanek eo moarvat ar gerioù "pakret" ha "fasipl"; evit "petu" avat n'oufen ket lavarout.

man : distaget /mæn/, dre nistummadur, e BrE. E krBr. e veze arveret stank ar ger-mañ, pa lavaromp kentoc'h bremañ "pelec'h" "e pe lec'h".

Un nebeut gerioù, anavezet mat ganimp, a vez en arver gant Roperzh ar MASON. ha n'int ket eus BrE., pezh zo aes da gompren eus perzh abostol ar brezhoneg peurunvan.

iskis : anavezet martez e kornioù zo a Vro-Ereg; Roperzh ar MASON avat a re aliesoc'h gant ur ger all "iskriv".

goular : n'eus ger arbennik ebet evel "goular" e BrE. : diouzh ma vez, e reer gant "dic'houst", "divlas", "meizh" (a dalvez ivez gleb, ledizh)...

engroez : er werzenn gant avat en deus lakaet ger BrE. "yoc'h".

mennoz : zo bet arveret a-wezhioù gant Loeiz HERRIEU, gwisket dezhañ ar skrivadur "menoh", dre fazi moarvat.

kad : zo bet adarveret nevez zo er yezh lennegel.

hiron : dizanav e BrE. a gement a ouzon.

neved : templ, zo un adarveradenn lennegel ivez.

ee'hon : pa lavaromp "fourmis" (!) e BrE., pe "frank", "ledan", na mui na maes.

BARZHONIEZH :

E sigur barzhoniezh Roperzh ar MASON, e c'hellomp gwelout da gentañ un nebeut gwerzennoù distummet gant ar skoueriekadur. E brezhoneg Ereg eo bet savet ar gwerzennoù-mañ ha gwisket warne gant an oberour e-unan, en doare-skrivañ peurunvan.

Er poz kentañ, e welomp "teñval" o klotenniñ gant "ael"; distagadur ar gwenedeg zo a bep eil, /el/ ha /tiqel/.

Evit "digarez" o vont gant "arre", e welomp diouzhtu un dra anavezet, pa gouezh ar "z" alies e gerioù evel "digarez"... ha pelloc'h "gwirionez" (o klotenniñ gant "hune").

Kasasañ tra er skrid-mañ, a c'hellomp sellout evel lennegel, eo ar verb "respontañ", evit "respont", a glotenn gant "kein" ! BrE. dre vras a zistag an holl dibennoù verboù en /eɾ/ pe /ɛɾ/. Amañ enta hon eus /respontʔɾ/ o klotañ gant /kɛɾ/ e Gwened-Uhel ha gant /kʔɾ/ e Gwened-Izel.

Pelloc'h hon eus "Aotrou" (BrE. /e y try/ o klotañ gant "ru(z)).

"Bougar" zo bet lakaet da vont gant "douar", pa glotont ervat e BrE.: /bɔar/ ha /ɑar/, o daou distaget en ur vouezhiadenn.

Er poz diwezhañ hon eus da reiñ distagadur ar brezhoneg-kreñn d'ar ger -mañ /mãñ/ o vont gant glan ha Keroman.

E-keñver pluennerzh e c'hellomp notañ un nebeut gerioù kaer : evel "ar re c'hoular", evit ar re gwan, klouar o feiz.

Pelloc'h e kaver "krederion laosk ha goular" ha pelloc'h c'hoazh "mor an Tercouar". o toareañ ar Mor Marv, ma voe sanket ennañ kêrioù Sodom ha Gomor, gouez d'ar Bibl.

Awenet eo bet ar varzhoneg-mañ gant bombezadeg kêr an Oriant e 1942. Anv zo enni eus un nebeut tud, ganet en Oriant :

BRIZEUG : ganet e 1803. Desavet en Arzhnou hag e Gwened. A savas un nebeut gwerzennoù brezhonek, dastumet en daou levrig Telenn Arvor ha Turnez Breizh. Anavezet eo dreist-holl evit e oberoù gallek.

SIMON : ganet e 1814, a reas politikerezh e Bro-C'hall. Bez' e voe Maodiern an Deskadurezh dindan an Trade Republik.

MASSE : ganet e 1822, sonaozour gall brudet.

BISSON : an admiral moarvat.

FUR : marteze an hinl a labouras war ar c'heltieg da vare Jozeb Loth (?).

)) o ((

Sadorn 30 Gouhere 1966

I S T O R

M a r i - E l e n M A Z E

DIWAR-BENN AN EMSAV SEVENADUREL ABAOE AR BREZEL-BED DIWEZHAN

"Gwalarn en deus krouet, en deus digoret hentoù, n'hon eus graet nemet ledanaat, kas pelloc'h", a lavar Per DENEZ (Preder, Tonkad 61).

Ya, goude ar brezel, e-kreiz an tamalloù a boueze kalet war choug tud an Emsav, ken sevenadurel ken politikel, o deus bet tri strollad, e Roazhon hag e Paris (Kened, Tir-Na-Nog, Al Liamm), ar galon da sevel uhel adarre ar c'houlouenn. Goude-se int bet kendeuzet da zont da Al Liamm, heulierien Gwalarn hag e skol. Sevenet o deus an hevelep doare labour war al lenn-egezh : barzhonegoù, kontadennoù, troidigezhioù a bep seurt. Lod eus skrivagnerien Walarn a vez adkavet en Al Liamm : ABROZEN, Youenn DREZEN, Reparz HEMON, Arzel EVEN, h.a... Kalz re all zo eus ur rummad yaouankoc'h. Menegomp Ronan HUON, rener Al Liamm, Per DENEZ, Youenn OLIER, ABANNA.

mari-elen maza

abErnez

Al Liamm a zo ivez un ti embann, hag a ro deomp geriadurioù, romantoù, levrioù barzhonegoù, danevelloù, ha danvezioù a bep seurt.

En-dro d'Al Liamm ez eus bremañ aozadurioù all, ur spered broadel dezhe ivez.

AR SKAOUTED BLEIMOR, strollad skauted savet e 1946, a gemer Breizh evel o bro, a-renk gant n'eus forzh peseurt bro all en Europa. Kevredet int bremañ gant skauted all Europa.

KAMP ETREKELTIK AR VREZHONEGERION, skol-hañv savet e 1948, en deus graet berzh azalek an derou betek pezh a welomp, gant ar c'hentelioù, ar prezegennoù fonnus a ro deomp, ar c'hoariva, hag all.. Aotre a ra da etre 100 ha 200 a dud bep bloaz, deskarded pe get war ar yezh, da vevañ e Brezhoneg penn-da-benn e-pad pemzek devezh, da bleustriñ war danvez Breizh hepmuiken.

AR BED KELTIK, savet e 1951 gant Roparz HEMON, ennañ keleier, arz, skiant, lennegezh, istor, kontadennoù, kanaouennoù, hag all.

BARR-HEOL WAR FEIZ HA BREIZH, savet e 1951 gant an Ao. KLERG, a zo katolik ha broadelour, liesseurt ivez he danvez.

HOR YEZH, savet e 1954, gouestlet d'ar yezhoniezh, ha staget outi GWERIN o pleustriñ war ar werinoniezh.

STUDI HAG OBER, dastumad studioù war ar speredelezh kristen, o kenderc'hel un oberenn savet arak ar brezel.

SKOL, savet e 1954, a bleustr war gudemoù ar gelennoùiezh.

WANIG HA WENIG, savet e 1958 dindan Skol a zo ur gazetenn evit ar vugale.

PREDER, savet e 1958, a zo gouestlet d'ar brederouriezh, d'ar skiantoù, d'ar sturvezhouriezh, hag all...

Ha ganet en e ser S.A.D.E.D., skol dre lizher evit deskiañ e brezhoneg danvezioù a bep seurt : yezhadur, lennegezh, istor, douaroniezh, fizik, kimiezh, jedoniezh, bevoniezh, h.a...

N'hellomp ket lavarout o deus kendalc'herion rannoù all eus an Emsav sevenadurel a-rak hag e-pad ar brezel : hini an Ao. FERROT hag hini Y. SOHIER. Ar re a zo deuet war o lerc'h o deus kuitaat ar mennoz broadel, betek mont da enebour dezhañ, dorn-ouzh-dorn gant ar C'hallaoued o ren. Alese o anv a Costezenn C'hall. Menegomp ganto savidigezh Brud e 1957. Savet eo bet "evit ar Brezhoneg", ha n'eo ket evit lakaat anezhañ da "vevel e servij kredennoù iskis pe froudennus". Danvez ar gazetenn a zo anezhi barzhonegoù, kontadennoù...

Distroomp bremañ war al labour, hag ar mennozioù douget war ar c'hellaouennoù meneget a-rak.

A-dreuz ur spell-buhezañ e welimp n'o deus ket an oberoù kemmet dremm. Embannet e vez barzhonegoù, kontadennoù berr, romantoù, studiademoù. Ar studioù a c'houlenne Roparz HEMON e derou Gwalarn (Ur Breizhad oc'h adkavout Breizh) a vez kaset da benn tamm-ha-tamm. Gallout a reomp bremañ komz en hor yezh eus kudennoù ken arbennik ha yezhoniezh, prederouriezh, istor, bevoniezh, jedoniezh, h.a... Ne lavaran ket ez eo echu al labour war an tachennoù-se, met bouc'het eo, evit kalz dindan veli S.A.D.E.D., ha kaset e vo pelloc'h. Hag ar yezh, dre-se, a zo o tiorren.

Ur sellad-arveziñ a ziskouezo deomp o deus kemmet ar

mennadoù hon doug : gouzout a reomp bremañ ne vo ket saveteet hor sevenadur pa vo kaset da benn ar stourm evit ar yezh, - en abeg ma n'hell ket ar stourm-se kendrec'hiñ drezañ e-unan -. Kaer en deus bet an Emsav Sevenadurel ober, abaoe 50 vloaz hag ouzhpenn ma'z eus anezhañ, ez eo aet bremañ hor yezh war zisteraat war he diskar zoken, ha ne vez mui komzet e nep lec'h, tost da vat, gant ar re yaouank dindan ugent vloaz. Ne chom nemet tud an Emsav.

Ar spered broadel n'eo ket kresket tamm ebet kennebeut, e-touez hor c'henvroiz. Ha n'omp mui evit tamall o dallentez hag o laoskijenn dezho : n'eo ket int o deus dibabet bezañ kenteliet e galleg, na klevout morse, er skol, komz eus Breizh nag eus ar brezhoneg. E gwirionez, n'heller ket karout ar pezh n'anavezet ket, tommañ d'ur vro ha d'ur yezh estren ha pa ve bet estrenaet.

Gounidigezhioù bikan war dachenn ar skol ne gasint ket ac'hanomp pell : lec'h ar brezhoneg a zo ken dister ha ken disprizet ma n'hell ket ar vugale er skol, nag an dud vras e vezint, tommañ dezhañ hep harp all eus an diavaez. Evel ma verke R. HEMON e Breizh Atao (Ur Breizhad oc'h adkevout Breizh) "un den a c'hell komz div, teir, peder yezh hag ouzhpenn. Ur bobl a-bezh ne c'hell ket kenderc'hel pell da gomz muioc'h eget unan".

Diouzh un tu all e ouzomp mat, - dre skiant-prenet e-pad ouzhpenn 50 vloaz -, ne vo biken aotreet gant ur Stad C'hall d'ar brezhoneg al lec'h a zlee kacout e skolioù Breizh.

Petra chom hepken ? Bezañ dieub, a-benn gallout ober al

lezenn. Ha setu penaos e tiwan mennoz ar Stad, ma ne fell ket deomp e kavo bod ar brezhoneg en ur mirdi, a-benn un nebeut bloavezhioù.

Traoù a zo bet graet ne vefe ket mat ober bremañ. Met d'o mare edont mat ha ret. Ha lakaet o deus ar stourm da vont war-raok. Evel-se da skouer hon eus bremañ ur mennoz fraezh eus hor gwirvoud "disoc'h da bergont bloavezh prederidigezh eus an Emsav warnañ e-unan" (ABANNA, Tonkad 65).

)) o ((

Yaou 04 Eost 1966

L E N N E G E Z H

G a b C H E R E L

G W E R Z A O U E R E Z H Maodez G L A N N D O U R

Fiv eo Maodez GLANNDOUR ?

Maodez GLANNDOUR a zo anv-pluenn ar beleg Loeiz AR FLOC'H.

"Loeiz AR FLOC'H, eme vBENNAD, a zo bet ganet e Pontrev.
Sant Maodez a zo anavezet kenañ er vro-se. Sant an Trev eo.
Ur chapel en deus e Kemper-Gwezenneg, tost da Bontrev.

GLANNDOUR a dalvez "war vord an dour". Ti kerent Loeiz AR
FLOC'H a zo e liorz e war ribl an Trev. Tremenet en deus e vak-
añsoù o roeñviñ war vagig e dad, hag ivez e Sant-Ke-Forzh-Trev
war an aod. An dour a zalc'h ul lec'h bras-tre en e awen, en e
varzhoniezh...."

N'eus forzh penaos, ret eo deomp-ni, a studi e oberenn,
kaout soñj ez eo Maodez GLANNDOUR beleg ha brogarour breizhat.
An daou berzh ha n'int nemet unan, a roio e liv d'e holl oberenn.

o
o o

gab chere

Breizhat eo-efi e gwirionez dre e anv, e c'hanedigezh ha dre e spered dreist-holl :

"Brezhon ac'h eus va c'hrouet
Brezhon ec'h adsevin
Gant va yezh disprizet em genou ..."

Ganet eo bet e Pontrev e 1909. Goude studioù klasel e skolañ Sant Jozef Lanuon e renas studioù a brederouriezh hag a zouconiezh e kloerdi bras Sant-Erieg. Eno eo e krogas Maodez GLANNDOUR gant studi ar brezhoneg. Hetek neuze, dizek e oa war Vreizh, hec'h istor, he lennegezh, he yezh zoken, hec'h arzoù-keer, kudennoù ar bobl vrezhon... D-pad e amzer-soudard e Gwengamp, e skoulmas darempredoù gant ar yezhadurour Ioeiz LE CLERC.

Ur wech beleget, e 1932, e voe kaset da Roma : talvoudus-tre e voe evit ar beleg yaouank (ugent-tri bloaz dezhañ).

En em gavout a ra gant an Tad GODO e laka anezhañ da lenn Feiz ha Freiz, Freiz Atao, Gwalarn.

Entenet e voe Maodez GLANNDOUR gant danvez Breizh.

Erfin e adkave Breizh hag e tizoloe barrezgzhioù ar brezhoneg evel yezh a stender, evel benveg hol lennegezh vroadel.

Deuet da vat gentañ an aotreegzhioù war an doueoniezh hag ar brederouriezh, e tremas e Paris ar bloavezh 1935 evit kas da benn un dezenn e zektor war ar brederouriezh.

E 1937 e krog da embann Studi hag Ober, hag e vout Gwalarn un dastumad eus e varzhonegoù.

Kelenner eo bet e kelenndi Sant Jozef Lanuon eus 1935 da 1940, betel bezañ galvet gant al lu. Tennañ a reas e vad eus e eil amzer-soudard evit sevel e oberenn Imprem a studiimp bremaik.

Abaoe an eil brezel-bed e voe Maodez GLANNDOUR lerc'h-ouzh-lerc'h kure e parrez Itron Varia Wir Sikour e Gwengamp, aluzener e lise Sant-Erieg, erfin person Louaneg.

Setu an den hag e vuhez berr-ha-berr.

Barzh ha prederour eo dreist-holl Maodez GLANNDOUR, met ouzhpenn oberennoù diwar-benn an danveziou-se e embannas skridoù liesdoare. Pemp rumm a c'haller ober en e oberennoù :

- Parzhoniezh : Milc'houd ar serr-noz ha Komzoù Bev a zo e bennoberenoù, hogen barzhonegoù niverus ha liesdoare a zo strewet e kelc'hgelaouennoù evel Studi hag Ober, Al Liamm.

- Prederouriezh : Divizadur, rannadur ar brederouriezh
Prederouriezh ha Broadelezh
Prederouriezh ha Speregezh
Prederouriezh ha Kristeniezh

Nag a dalbennoù dedennus !

- Doueoniezh : Vuhez Doueal a zo bet embannet dindan an anv "Le Signe de la Table" e "La Vie Intellectuelle", kelc'hgelaouenn Dominigiz Vro-C'hall, Banvez ar Vuhez, Pennas kompren ar Werc'hez Vari.

- Kontadennoù strewet e-barzh kelc'hgelaouennoù. Div anezho dreist-holl a zo marzhus : Ar Factrig hag a wele e diabarzh an traoù, Urien ar Reder.

- Skridvarnerezh : Ne zisplij ket kennebeut da vMaodez GLANNDOUR ar skridvarnerezh. Skrivet en deus diwar-benn an arz : Diviz Kasiwellonc, ha diwar-benn ar c'hoariva : Arouezlezh Gurvan. Met ar pennadoù plijusañ evit hon testenn hiziv a zo : Gant hentoù meur ar gwerzaouañ, Ar Varzhoniezh hag ar gwerzaouiñ.

Er skridemoù-mañ e tispieg Maodez GLANNDOUR e-unan e vennozioù diwar-benn ar barzh hag ar varzhoniezh.

Ar roll berr-mañ a zaskouez pegen pinvidik eo ijin an aozer. Anez e vefe deomp studiañ er gentel-mañ oberenn Maodez GLANNDOUR en he fezh. Setu perak ne studiomp nemet Maodez GLANNDOUR barzh, ar pezh a zo diaes e gwirionez : "N'on ket disrannet e div lodenn, emezañ e-unan, barzhoniezh war un tu, komz-plaen war un tu all."

Pelec'h e tesaou ar varzhoniezh, pelec'h ez echu ar yezh plaen ? N'eo ket anat ar respont : "Komz-plaen ha barzhoniezh a vez ennon o tivizout hag o mouezhioù en em veek ma n'ouzon ket a-wechoù pehini zo o komz."

A-barzh plediñ gant arz Maodez GLANNDOUR dre ar munud, ez eo dav studiañ e vennozioù diwar-benn ar varzhoniezh, hag ar gefridi a ro d'ar barzh.

Da gentañ-holl ez eo ret diforc'hañ meur a stumm er varzhoniezh : "Ar varzhoniezh n'eo ket ar gwerzaouifi... Ar gwerzaouifi a zo dreist-holl ul labour sonerezh" : troioù micherel o tennañ muioc'h d'ar c'halvezerezh, d'ar seiz eget d'ar galon : "Mar menez, Spered den, gouzout petra eo ar varzhoniezh, astenn da zivrec'h evit kenderc'hel an hollved ha santout e galon vev o lammat ouzha da galon vev." (*Imman*).

Ar varzhoniezh a zo enta kenunvaniezh ar boud en e bezh, korf hag ene, gant buhez an hollved : enklask burzhudus en ur bed a vuzhudoù, enklask an holl voudoù, emenklask an den e-unan : "ar bezañ a zo abeg a-walc'h da bep boud."

"Ar varzhoniezh eo se :
Klevout hag heklevout
Selaou ha daskanañ ..."

Met petra klevout ?

Ar bed holl : "Ateromp an traoù : eilgeriañ a reont, pep hini gant e zoare : selaou a ran, klevout a ran : dasseniñ a reont ennon..."

Evel-se, sevel barzhonegoù a zo un doare beaj vuzhudus evit Maodez GLANNDOUR : bourrañ a ra o tizoleiñ dremmoù niverus ar varzhoniezh hag oc'h arverañ un tamm bennak eus barregezhioù didermen hor yezh.

N'eo ket a-walc'h gweladenniñ tirioc'h marzhuz, dav eo d'ar barzh treiñ e geledadurezh en ur yezh dedennus.

Anañ emañ an dalc'h.

E meur a zegouezh, en deus lavaret Maodez GLANNDOUR fraezh e soñj : sonerezh e tle bezañ dreist-holl ar varzhoniezh.

N'eo ket souezhus al levezon-mañ eus ar sonerezh war e zoare da skrivañ pa anavezet e empertiz a sonnoù. Ken heson ha frazennoù ur gensonadeg pe ur c'honserto e vez e varzhonegoù. Arroud ebet, ma ne zassone ket emañ kensoniezh ar grouadelezh. "Nag ur barzh ar paotr-muzik-se !" eme ABOËZEN.

Docust ha n'eo ar barzh nemet ur rimer sturiet gant faltazi ur vuhez didalvoud ? pe, en enep, daoust hag en deus un dra bennak da zegas d'e genvroiz ?

"Ar barzh, eme vMaodez GLANNDOUR, eo an hini a car kenstrollañ traoù disheñvel ar bed en unvaniezh un hevelep selladenn, an hini a spurmant etre ar boudoù e-unan evel etrezañ hag int, dar-empredoù kuzh ha dianav d'ar re all".

Evel-se e vez ar barzh an hini "a glev hag a heklev, a selaou

hag a zaskan", n'eo ket evitañ e-unan, evit displegañ d'e vreurdeur "an holl wirionez douarel ha neñvel", ne lavaran ket.

"Klasket em eus adkavout evidon ur weledigezh kristen eus ar bed hag eus ar vuhez, ha lakaat ar re all da dennañ gounid eus va skridoù".

Ur roll kevredigezhel en deus ar barzh eta : lakaat e vreurdeur a-unan gant ar groudelezh evit o uhelaat : "An den war an douar n'eo ket galvet da anaout holl skiantoù ar bed, met d'ober ar pezh a zo reizh. Gwelout a reomp bomdez pebezh reuzioù a sko gant an den pa ne glask nemet an ijin hep uhelaat ar galon... rak d'an droug e tro an ijin hep ar galon-reizh ha n'eo ket ar poell a ra d'un den bezañ mat, met e galon"...

Galvet eo an den. Ar barzh a zo galvet muioc'h eget nep piv bennak da ganañ klod da Zeus. Ne c'hell ket chom dizoberiant e goudor ar porzh. Ret eo heuliañ an Awen.

Hep lennegezh, n'eus sevenadur ebet. E pep bro hag e pep yezh e vez savet gwerzennoù, hag e pep bro ez eus ur sevenadurdioutañ hec'h-unan :

"Klask adkavout ur weledigezh eus ar bed ha war un dro chom brezhon-mik gant hon doareoù santout a-ouenn".

Strivoù ar barzh a zo gounidus evit e genvroiz. Ne vez ket eta ar barzh un den awenet hepken, a skign e labour hervez froudennoù an Awen, met un den atebek, un den engouestlet e-keñver e genvroiz, e-keñver e vro. Ur roll kevredigezhel, relijiel ha sevenadurel en deus eta.

Youenn OLIER en deus studiet en e bennad : "Notennoù diwar-benn dremmoù 'zo eus oberenn Maodez GLANNDOUR" embannet gant

Al Liamm e 1950 (Niv. 23), darn eus ar mennozioù a gaver e barzhonegoù Maodez GLANNDOUR.

"Oberenn Maodez GLANNDOUR penn-da-benn hag e veanosiadur eus ar bed a gav mammenn er garantez-vro hec'h-unan" a lavar Youenn OLIER.

Daoust ha ne vefe ar garantez-vro-rañ nemet ur garantez par da hini ar rannvroelourion o huandiañ gant teneridigezh ouzh o "mammvro vihan" ? Hini ur gour eo karantez-vro Maodez GLANNDOUR hag eus e oberenn e tenn a-wel e fiziañs didermen e Doue, hag e fiziañs e dazont ar vro : a-walc'h e vefe d'e genvroiz lakaat da ziwanañ ha da greskiñ enno barregezhioù dianav dezho c'hoazh, hag eñ da dresañ poltred an den skouer, cleze hini ar c'hristen gwirion. Degaset eo evel-se da damall ar pezh a ya a-enep d'an uhelvennad-se : n'eo ket ur souezh eta e vefe kavet en e varzhonegoù (Imram dreist-holl) pennoù a denn kalz d'ar flemmgan : "flemmañ an arz klasel, ar skolveur c'hall muioc'h c'hoazh eget o burutellañ eo a ra Maodez GLANNDOUR" eme Youenn OLIER. Hag a-wechoù e teu spered ar barzh da virviñ : "Tarzhañ a ra neuze ar barrad awen; ar galon a gomz.."

"Tremen ken buan en ur varzhoneg evel Imram eus an delemnegezh d'ar flemmerezh, eus ar sioulder d'ar gounnar, eus ar berlezenn da drompilh ar varn. En anv ar varzhoniezh e ran evel-se, en anv ar vuhez personel hag hollvedel".

+

Muioc'h eget n'eus forzh piv, marteze, en deus gouezet Maodez GLANNDOUR lakaat da glotañ danvez e varzhonegoù gant ar furn, dre c'hoari gant ar gerioù, ar c'hlotennoù ha ment ar gwerzennoù.

Diogelid a ra Youenn OLIER : "N'eo ket anat (arz Maodez GLANNDOUR) d'ea hini n'en deus ket lennet pizh e varzhonegoù". Ar barzh e-unan a lavar : "Abafoc'h (eget hini Iwerzhon) eo ene Breizh : ne blij ket dezhañ en em zizoleid, nag en em zispakañ betek re. Deoc'h-c'hwi, peogwir ez oc'h moarvat speredek, da gompren ar pezh ne vo nemet mouslavaret."

Ar pezh a vefe anvet diaked gant ar sperezoù skafiv a zo e gwirionez dilorc'hentez eus e barzh.

Pell emacomp eus an delemnegezh klasel dieleveziek ha safarus pa vez ar barzh heñvel ouzh al leñverezed a-wechall : seul drouzusoc'h, seul grisoc'h ar boan.

Evit dizoleid arz Maodez GLANNDOUR, eo ret mont d'e oberenn gant ur sperec nevez, un ene bugel, ankounac'haet ganimp reolennoù ar glasolezh ha kement reolenne diseoc'hus "a laz buhez vlin ar boudoù".

Maodez GLANNDOUR a zistaal mentadur ingal ar gwerzennoù : "Eus sperec ar c'hempouez, eus ar werzenn c'hwec'h ha c'hwec'h mouezhiadenn da viken, hon dieub, Aotrou" emezañ.

Evel ma c'halled gortoz, e vo kavet liesment-kenañ ar gwerzennoù.

"Tri hent ez eus evit pellaat diouz al lavar boutin ha tizhout pal ar c'han, tri hent a vez a-walc'h mont gant unan anezho daoust ma c'heller ivez o fleustriñ a-gevret" a lavar deomp Maodez GLANNDOUR.

Ar c'henventerozh e niver ar mouezhiadennoù.

Kenventerezh ar pouezmouezhioù.

Kengenerozh ar sonioù.

An tri hent a-gevret en deus pleustret Maodez GLANNDOUR.

KEBED pe KENVENTEREZH ar mouezhiadennoù.

En Imren, Kan al Leinoù, e kavomp ur skouer eus an hent kentañ : disheñvel eo heñ ar gwerzennoù.

4 = 2 + 2	GLAC'HAR, // GLAC'HAR
14 = 2 + 5 + 7	GWA ME, // N'ON KET BELLEZEK / DA GLEVOUT KOMZOU VA DOUE
6 = 2 + 4	GLANA / VA C'HALON WAN
9 = 5 + 4	HA KAS DAVEDON / ARC'HABL AN TAN
8 = 4 + 4	UR STERBEENN / N E VIZIED
8 = 3 + 5	UR C'HACUBENN / EUS AL LESTR-EZANS
8 = 3 + 5	ENTANET / DIRAK DA VEZANS
10 = 6 + 4	EVIT STEKIÑ GANTI / OUZH VA DIWEUZ

Evit merkañ gwelloc'h lusk ar werzenn e vez enni un troc'h anvet un arsav. Kreñv pe greñvoc'h eo an arsav. Meur a arsav a c'hell bezañ en hevelep gwerzenn.

KELLUSK pe KENVENTEREZH an taolioù-mouezh.

An eil hent a c'heller termenañ gant div lezenn-diazez ar c'hellusk, a vez roet gant Maodez GLANNDOUR ha displeget gant KERVELLA e Diazezoù ar sevel gwerzioù :

- Etre daou daol-mouezh ne zle ket bezañ en tu-hont da ziv vouezhiadenn dinerzh.

- Ne c'hell ket div vouezhiadenn doniet dont an eil war-lerc'h eben nemet ha mirout a rafed ur gwir siouladenn etrezo.

Tennañ a reomp ar varzhoneg-mañ eus Troellennoù glas :
An Erc'h war an enezeg.

. - HAG-BÑ EO DISKENNET AN NOZ
 3 - + 5 .
 - - ELERC'H GWENN-KANN AN HANTERNOZ
 4 - + 4 .
 - (.) - HAG E KOUSKONT ER MOR, MORZET
 4 - + 5 .
 - - PLEGET O FENN DINDAN O FLUÑV
 4 - + 4 .
 - - N'EO KET ELERC'H, AN ERC'H
 3 - + 3 .
 A ZO KOUZHEB ASKELLEK EN ENEZEG
 4 - + 7 .
 - - N'EUS EN ABER 'MET REC'HIER
 3 - + 4 .
 - A HUÑVRE KUÑV DINDAN O FLUÑV
 4 - + 4 .

N'o deus ket ar gwerzennoù an hevelep niver a vouezhiadennoù. Heuliañ a reont evelato lezennoù ar c'hellusk. N'eus ket en tu-hont da ziv vouezhiadenn dinerzh etre daou daol-mouezh.

E gwirionez ez eus div vouezhiadenn doniet an eil war-lerc'h eben en trede gwerzenn : MOR, MORZET, met dleout a reer lakaat etre MOR ha MORZET ur siouladenn aroueziet a-hend-all er skritur gant ur ekej.

KENGLOT pe KENGANEREZH ar sonioù.

"Evit lakaat ar werzenn da skeiñ war ar spered, evit reiñ dezhi ur wir dalvoudegezh hud, ez eus un doare ober a vez graet gantañ dalc'hmat hag eo lakaat an hevelep son, un hevelep lizherenn da zont a vareadoù resia. Ar gerioù heñvel-se a glot etrezo, setu perak e lavarer e vez klotennet ar gwerzennoù neuze, ha pep hini eus ar rannoù lakaat da glotañ a zo ur glotenn" a lavar KERVELLA. Kompren a reomp neuze an doare m'en deus Maodez GLANNDOUR pleustret an trede hent.

Diforc'hañ a reer ar c'hlotennoù evel-henn :

Ar c'hlotennoù son ma lakaer da glotañ sonennoù hepken etrezo. Da skouer :

"EVEL SKED DIAVAEZ AN ENE
SPLANNAET OUZH DREMM BEURGENEDUS HON DOUB." (Komzoù Bev)

Ar c'hlotennoù kenson ma lakaer ar c'hensonennoù pe ar strolladoù kensonennoù da glotañ diouzh o zu :

"ESPER, PRIED, HA STEREDENN
.....
KALON, SKIAERDED, REN VA FEDENN ..." (Te, o Salver...)

Ar c'hlotennoù rik ma c'heller lakaat da glotañ an hevelep sonenn harpet gant kensonennoù heñvel :

"MIZ DU !
AET AR BED KOZH DA GOZH LUDU." (Komzoù Bev)

Er gwerzennoù-se en deus lakaet e kenglot ar c'hensonennoù ivez e diabarzh ar werzenn ouzhpenn ar c'hlotennoù-son dibenn pe ar c'hlotennoù dibenn : Maodez GLANNDOUR, er gwerzennoù-mañ, en deus lakaet ouzhpenn kensonennoù da glotañ e diabarzh ar werzenn.

"HAG EN OAPLOU GWER
.....
E LUGERN GWENER."

"PESEURT PLANEDENN HON HINI !
.....
EVIT LUSKAN HON MELKONI."

E-kichen ar c'hengan-se war ar c'hensonennoù, e c'hell bezañ ivez sonennoù o kenglotañ. Adkemeromp ar varzhoneg : An Erc'h war an enezeg :

"HAC-EN HO DISKINNET AN NOZ,
 ELERC'H GWENN-INN AN FLANDERNOZ,
 HAG E KOUSKONT ER MOR, MORZET,
 FLEGET O FENN, DINDAN O FLUNV ?

N'HO KET ELERC'H, AN ERC'H
 A ZO KOUZINET ASKELLEK EN ENNEZEG
 N'EUS EN ABER KET REC'HIER
 A HUIVRE KUUV DINDAN O FLUNV."

Ar barzh e c'hell ete lakaet da glotañ sonennoù etrezo,
 kensonennoù etrezo, pe aliesoc'h soniadoù.

Ar soniadoù-mañ a c'hell bezañ lakaet e dibenn pe e di-
 abarzh ar werzenn hec'h-unan.

Kent komz eus kudem ar c'hlotennoù dibenn pe diabarzh
 eo ret dimp degas da soñj liessourted ar mouezhiadennoù.

Hervez lec'h ar c'hensonennoù e c'heller diforc'hañ :

- Mouezhiadennoù boull e echu gant ur sonenn, evel TI,
BRO, GWRI

- Mouezhiadennoù serr ma teu ar sonenn da gentañ : AR,
ANT, INTER.

- Mouezhiadennoù gwasket m'emañ ur sonenn etre kensonennoù :
MAR, PLANT, STRINK.

Ar glotenn dibenn a zo ur glotenn vouezhiadennek, neuze e
 rank an holl sonioù klotañ adalek ar sonenn diwezhañ.

Mar dec boull ar vouezhiadennek diwezhañ, eo a-walc'h kaout
 ul lizherenn hepken o klotañ :

"AWEN, merc'h Doug
PENAOS HEBZEL OUZHIT, O FRIED VA ENE" (Milc'hould ar serr-noz)

Ma ne vez ket boull ar vouezhiadennek diwezhañ e rank ar
 gensonenn pe ar c'hensonennoù a zo war-lerc'h ar sonenn bezañ
 heñvel :

"PEP KABRDER, PEP TENZOR
DIRAZOUT GANTAÑ 'ZO DIGOR." (Milc'hould ar serr-noz)

Ret eo ouzhpenn renkañ klotennoù 'zo hervez o finvidigezh.

Menegomp da gentañ ar c'hlotennoù prim ma reer hepken gant
 klotennoù-sonenn :

"NA VO KET DU NA ROUPENNET DA DJL
MET RA VO BOULL DA ZREMI HA LIRZHIN DA LAGAD"

Ar c'hlotennoù barr pe vez harpet gant ur gensonenn da
 vihanañ dirak ar sonenn :

"BIKEN NE ZEUJONT ENDRO.

EN UR MOR A VARQ,..." (Komzoù Bev)

Ar c'hlotennoù pinvidik pa'z eus kengam adalek sonenn an
 eil mouezhiadennek diwezhañ :

"NA GRENIT KET, VA C'HARIDI.
DEUIT GANNIN, DIBABIDI." (Komzoù Bev)

Gwelout a raimp bremaik perak n'eo ket dispar ar glotenn-
 mañ daoust dezhi bezañ pinvidik.

Ar c'hlotennoù pinvidik-mor pa'z eus c'hoazh da nebeutañ
 ur gensonenn o kengañ dirak sonenn an eil mouezhiadennek
 diwezhañ.

Dibaot e vez, e gwirionez, ar glotenn-dibenn e oberenn
 Macdez GLANNDOUR; lavarout a ra e-unan : "Ar glotenn-dibenn a
 heñvel din peurliesañ degouezhout evel un taol mandore pe
 simbalennoù, evel ur c'hlozadur, ur pik sonel. Setu perak ez
 eus da ziwall ganti ne harzfe ouzh al lañs a zo tra skoemp ha
 gwiridik, met kant gwech talvoudusoc'h eget ur glotenn"...

Kompen a reer neuze rouezded ar c'hlotennoù-dibenn, hag

e tibab a-wechoù Maodez GLANNDOUR klotennoù lakaet da "fall"
gant ar c'hlanvezhourion, evel lakaet da glotañ :

stummoù ar verb kenetrezo,
an arzoennoù displeget;

"BARZHONIEZH C'HLAN, KOMZ C'HOAZH OUZHIN,
RAK TE 'HINI HAG A QIR DISKOUZ DIN..."

an anvioù-gwan, enno un dibenn a gaver alies :

FLANNOU KRENUS,
A LUGERNO DIOUZHTU GANT BANNOU KANTREÜS" (Komzoù Bev)

an anvioù lies gant dibennoù boutin :

"HAG A-NEVEZ, DRE HOLL, WAR DREMM AN DOUAROÙ,
O DEUS TREGERNET C'HOAZH KANENN HA KANENNOU."
(Milc'houd...)

an anvioù enno un dibenn a zeu alies :

"PIV 'LAK ENNOC'H KEMENT A LEVENEZ ?
HA PIV A REN HO SONEREZH ?"

Skrivañ a ra Maodez GLANNDOUR : "Évit ar glotenn-diabarzh
ez eus meur a stumm d'ober reolennoù strishoc'h pe laoskoc'h...
Peurliesañ, gant ar c'hlotennoù diabarzh e lakaer da zasseniñ
an eil lodenn eus ar werzenn gant eben. Hag e vezer tuet da
lec'hiañ ar glotenn e dibenn ar rannwerzennoù a-rack an troc'h
hag ar siouladenn. Ne c'heller ket lavarout e vefe ret kouls-
koude... Graet am eus va-unan gant ar glotenn diabarzh a-
wechoù hervez ul lezenn laoskoc'h am eus kavet ampledus a-
walc'h : lakaet er rannwerzenn gentañ unan eus an teir mouezh-
iadenn diwezhañ da glotañ gant unan eus teir mouezhiadenn
diwezhañ ar werzenn."

Gwelet hon eus endeo ar c'hlotennoù diabarzh en An Erc'h

war an enezeg..

A-hed meur a varzhoneg e kaver strewet klotennoù-diabarzh,
hervez reolennoù laosk pe laoskoc'h.

"ARWANN AR SKLEUR
WAR DENN BODVEUR"
"GANT FLANN HA LANN ENKREZ HA LEVENEZ" (Komzoù Bev)

pe :

"A NOZ ! NANN ! N'AZ MALLOZHIN KER !
NOZ C'HWERY, NOZ C'HARY,
NOZ AN DOAN, NOZ AR BOAN,
NOZ AR GWALL, NOZ AR FALL,
NOZ AR GLAC'HAR, NOZ AR C'HARC'HAR.." (Inram)

Arabat e vo dimp kas re bell hevelep enklask.

"Ar sonioù huddiskouezus, sed ar re a dalvez er varzhoniezh"
eme vMaodez GLANNDOUR. Ha Youenn OLIER da ouzhpennañ : "N'en
doa tamm c'hoant Maodez GLANNDOUR da ober eus e varzhonegoù
divinadelloù torrpennus. Mennout a ra lezel e bluenn da redek
gant lamm e galon. Rak se e tibabas ar furn laosk a-walc'h a
zo gant e varzhonegoù."

Ur wech studiet an tri hent disheñvel : kehed, kellusk, ken-
gan, hon eus da welout bremañ penaos ez int bet pleustret gant
ar barzh, penaos ez eo stummet ha strollet e werzennoù.

Kavout a reer gwerzennoù a bep ment, dibaot eo ar barzhon-
egoù skrivet penn-da-benn gant gwerzennoù ingal. A-wechoù eo
kemmaesket zoken komz-plaen ha gwerzennoù en hevelep oberenn.
E Bragerizoù-Eng, da skouer, e komz-plaen emañ an destenn
diwezhañ. E Troellenoù glas e komz-plaen emañ ivez an Trede
Troadur pa'z eus gwerzennoù er re all. Met e komz-plaen zoken
eo lusket al lavar. En Trede Troadur : Morenn ha Lenvy, e kaver

ar frazenn-mañ :

"HUNIÑ A RIN EN FEOC'H DOUE / HA ROZ E VO DIN AN HUÑVRE."

Un arsav a rann al lavarenn e div elfenn gempouezet mat.

Evit pezh a sell ouzh hed ar gwerzennoù e roimp un nebeud skouerioù heplren .

Gwerzennoù unan, div, teir mouezhiadenn ne vezont kavet nemet kemmesket gant re hiroc'h :

"WAR SKLERIJENN WENN,
WAR DOENNOÙ LENN,
EVEL LUTR AN DIR
A LINTR."

Feder mouezhiadenn : Menez :

"MENEZ GLIZIN
LINENN DENER
EN BRUMENN GAER
AN ABARDADZ,
MENEZ GLIZIN." (Komzoù Bev)

Pemp mouezhiadenn : Sklerijenn vintin :

"SKLERIJENN VINTIN
A SKARZH AN DAMNOZ
GANT DA ZIWEUZ ROZ
DA ZACULAGAD GLAS
CHOM UR PENNAD C'HOAZH
EVIT MA'Z KVELLIN."

C'hwec'h mouezhiadenn : Feskig ar mor :

"LAVAGNON 'Z EUS HIZIV
PEGREN BRAV 'VO DIN-NE
MONT DA HEUL AN HOUL BRAS."

Lizh mouezhiadenn : Kan-goafv an dridi ...

"WAR AN HENT BRAS, NE DREMEN DEN ...
NEMEDOMP, GANT HOR MOUEZH UNFON,
O KANAN TRIST D'AN YENIJENN..."

Dek mouezhiadenn : Menez Bra :

"O TAV, VA ENE ! TAVIT, PARKOU ERIZH !
RAK 'US DA CHAL HO SONJOU BERR HA ERLEK,
UR MENEZ MEUR A BAR, E BENN EN MEÑV."

Daouzek mouezhiadenn : Milin :

"BOUREOUILH AN DOUR A RULLH ER ROD FLIFLOKEREZ
HA SAFAR AN TARAN WAR REC'HIER AR CHAOSER,
A MOUEZH AR WAZH A SOURR HAC A RED HIBOUDUS !"

Gant gwerzennoù hiroc'h e ra ivez Maodez GLANNDOUR kemmesket gant gwerzennoù berroc'h.

Ar barzh a c'hellfe sevel ur steudad gwerzennoù hep liamm ebet etrezo. Peurvuiañ avat e vezont erret pa ne ve nemet dre ur glotenn dibenn. Dougen a ra ar strolledoù anvioù savet gant niver ar gwerzennoù : triadenn, pevaradenn, c'hwec'hadenn ... Reññ a reomp ur skouer eus an driadenn hag ar bevaradenn :

Peuznoz

"DU WAR C'HLAS MELEN
WAR AN OABL GOULLO
NEUZ AN TEIR SAPRENN."

Takennoù bev

"PETRA EO ? TAKINNOU GLAV
A LINTR ER BRANKOU NOLZH, TAKENNOU BEV,
EME AN EVN A SELL OUTO
TAKENN E LAGAD OUZH UN DAKENN."

Kavout a reer ivez pempadennoù, c'hwec'hadennoù ... Evit pep rummad ez eus lezennoù o sullout ouzh ar c'hlotennoù, lezennoù displeget splann gant KERVILLA e Diazezoù ar sevel gwersioù. Met eze c'hoazh e hañval Maodez GLANNDOUR reiñ d'ar c'hensonerezh un dalvoudgezh vrasoc'h eget d'an doujafs ouzh ar realennoù.

"DALC'H, HA DALC'H, HA DALC'H,
NA DAV KEN, NA DAV KEN,
HA LEM AN NOZ DA DRBIN HAG AN DRIZ,
HA DRIZIOU WAR ZBIZIOU, HA NOZIOU WAR NOZIOU,
MET KENDALC'H GANT DA GAN, DIZEHAN, DIDERMEN." (Milc'hould.

Difrouezh e vefe klask reolennoù strizh d'an hesoniezh.
Daoust ha ne lekaer ket ar varzhoniezh en arvar en ur zispleg-
añ anezhi ?

"E-lec'h reiñ da intent, (ar varzhoniezh) a ro da santout"
eme gKERVELLA.

Lezomp ar varzhoniezh, an hesoniezh, mont tre en hor
c'hreiz hep he dielfennañ anez klask he dispenn.

"..... mouezh taer ar ger
'vel hini ar vomberd eilet gant taboulinoù,
Mouezh tener ar ger
Evel kammedoù skafiv war an tonnoù..."

A-holl viskoazh eo bet techet ar varzhed d'ober gant ger-
ioù divoutin" eme vMaodez GLANNDOUR.

Mard eo gwir al lavar groñs-mañ evit barzhed 'zo, KER-
VERZIOU da skouer, oc'h arverañ gerioù rouez kemeret ganto
er c'hrennvrezhoneg, n'eo ket talvoudus evit reoù, evel Roparz
HEMON pe Ronan HUON, a fell dezho sevel o barzhonegoù gant
gerioù ar vuhez pemdezisk.

Evit Maodez GLANNDOUR, damant ar sonerezh a hañval tremen
a-raok pep damant all.

Kavout a reer tro-ha-tro gerioù arnevez, gerioù-pobl, e-
kichen gerioù barzhoniezh rik : Kan-goafiv an dridi war linenn
orjal ar pellgomz.

"Ne gil ket dirak ar gerioù dilorc'h pe c'hros zoken"
eme Youenn OLLIER :

"HA BET OUT BET EN E GENVER EVEL UR C'HAST."

Feurliesañ e klask avat gerioù o tegounañ skeudenoù :
"TAMOLODET EO AR BED EN E GOUSK.." (An eur-se 'zo ken tost..)
pe

"HA KERZHED GMEVN O C'HANVALED
EN DEUS GWAGENNET WAR GERN AR MENEZIOU." (Milc'hould ...)

Arverañ a ra ivez gerioù barzhoniell, evel ar "selin" evit
an "abardaez", pe al "litenn" evit ar "glavig".

Daoust maz eo gouest Maodez GLANNDOUR da ober gant ur ger-
iadur pinvidik, ez adlavar alies an hevelep gerioù pa vez ezhomm.

Er varzhoneg Glav, e klevet tro-ha-tro tri ger disheñvel
evit ar vrumenn : "morenn", "lusenn", "latar".

En Ur C'han hep komz na sonerezh, kichen-ha-kichen e kaver :
"trous"ha"storlok";e Traoù marzhusañ : "ar c'hinvi"ha"ar man"
ha pelloc'h : "lonker"ha"ever", bir"ha"saezh".

Er c'hontrol, e kaver en An Donn, an hevelep gerioù adlav-
aret evel un heklev :

"AN DONN A VOUSKAN EN STOULDER AR BEURE
A-HED AN AODOU HE C'HOMZOÙ HIRABZHUS,
MA SELAOU AN DOUAR AR MOUSKAN DEDENNUS,
EN STOULDER AR BEURE. EVEL UR PLAC'HIG
E C'HOART GANT AR BILL, AN DONN,
O VOUSC'HOARZHIN 'VEL DIBREDER, 'HED AN AODOU."

Eno c'hoazh e tremen damant ar sonerezh a-raok an holl
zamantoù.

o
o o

"Grit bremañ diwar va displegadennoù pezh a garoc'h" e
skrive Maodez GLANNDOUR evit klozañ e studiadem : Gant hentou
meur ar gwerzaouiñ".

"A-us da bep tra lakait ar spered" e lavare-efi ur c'hard-
kantved 'zo hag abaoe n'eo ket kemmet e vennoziou war gudenn
ar varzhoniezh. Setu ar pezh a skrive adarre nevez 'zo e Freder :

"Ha penaos skrivafi, penaos gwerzaouiñ ! Aet eo pep unan
hervez e galon ha NERVERZIOU en deus kizellet ha rimet e
vein priziuz e-keit ma save LANGLEIZ gwerzennoù dieub diouzh
skouer KALLOC'H, e-keit ma plije da Roparz HEMON implijout
menterezh ar saozneg. Kement-se evit gwir a zo nebeut a dra.
Gwiskemant hepken. Ar pezh a zo talvoudusoc'h hag a vo da
studiañ deiz pe zeiz en hol lennegezh eo frammdur diabarzh
hor gwellañ barzhonegoù. Merzhet e vo neuze penaos hon eus
krouet war an dachenn-se stummoù nevez, stummoù a zo marteze
dimp-ni hon-unan, marteze heñvel ouzh reoù all, frammdurioù
speredel a zo kalz skeudennusoc'h ha talvoudusoc'h eget klot-
ennoù pe diabarzh pe diavaez pe klotenn ebet."

) o ((

Gwener 05 Eost 1966

I S T O R

R o n a n J O L A I S

B R E Z E L - D I A B A R Z H I W E R Z H O N

Talvoudus eo deomp, Brezhoned, studiañ istor kempredel
Iwerzhon, ha gwelout penaos o deus Iwerzhoniz renet o stourm
evit ar rezid politikel.

Diwar-c'horre e van alies anaoudegezh ar Vrezhoned a-
zivout istor Iwerzhon. Anavezout mat a reer skeudennoù evel
hini Padraig MAC PIARAIS o lenn Embannadur ar Republik diouzh
lun Fask 1916; anavezout a reer ivez ar gwaskerezh saoz hag ar
brezel enep-saoz a heulias. Ne oar ket an holl avat perak ha
penaos e voe e-pad ur bloavezh, goude ar Feur-Emglev gant ar
Saozon, ur brezel etre Iwerzhoniz, krisoc'h alies eget ar brezel
enep-saoz.

Evit gwir, ne reer ket alies meneg eus ar brezel-se, ha
ne blij ket kalz da Iwerzhoniz, zoken bremañ, komz diwar-benn
an darvoudoù-se : ne vezont ket kelennet er skolioù, hag an

dud yaouank hiziv ne ouzont nemet nebeut a-zivout ar brezel-diabarzh.

Evit meizañ mat pezh a c'hoarvezas, ha gant petore devoudoù e voe degaset ar brezel-se, ez eo ret daveññ da zrouz ar c'hantved-mañ.

Engehentet e voe an Emsav a zisoc'has da zispac'h 1916 diouzh ar "Gaelic League" (Kevre Gouezelek), strollad savet gant Douglas HYDE.

Dindan levezon ar strollad-se e gwirionez eo bet adsavet emskiant brondel Iwerzhoniz. Aozet e veze kentelioù abardaez da zeskiñ ar gouezeleg. Stummet e voe sternataerion an Emsav iwerzhonat gant ar C'hevre Gouezelek. E derou ar c'hantved e voe unvanet an emsaviou disheñvel o stourm evit Iwerzhon; krouet e voe an I.R.B. "Irish Republican Brotherhood" (Breur-iezeh Republikan Iwerzhonat). Ur strollad kuzh e oa, broadel ha republikan, renet gant Padraig PEARSE (MAC PIARAIS). Hemañ a rae ivez war-dro an "Irish Volunteers" engouestlet war ar maez e-touez kouerion. Ur strollad digor e oa.

Diouzh un tu all e oa James CONNISH o tegas nerzhoù ar vicherourion. Sokialour e oa; mennet e oa da sevel ur Stad iwerzhonat dieub ha sokialour.

Diouzh e du e tegase Arthur GRIFFITH un doare nevez da veizañ ar stourm politikel. Dre genlabour al luskadoù-se e voe prientet emsavadeg 1916 ha ganet ar Republik.

Kreskiñ a reas an Emsav broadelour en Iwerzhon, evit darn, en abeg da daolioù an "Orañjeourion" en hanternoz Iwerzhon. Ur bezen a voe krouet ganto e 1912 hag ur "c'hCovenant" a voe sinet evit stourm a-enep da raktres an "Home Rule". E 1914 e prenjont armoù digant an Alamanned.

Dirak an Emsav-se e reas ar vroadelourion o mennoz da sevel ur bezen diouzh o zu. E 1913 e savjont ul lu, "National Volunteers" e anv, leviet gant Eoin MAC NEILL, ha gant Emsav-erion CONNISH e voe savet ar "Citizen Army" (lu keodedat).

En abeg d'ar brezel 1914 e voe daleet saveladur an "Home Rule" betek ma tistrofe ar peoc'h. E gwengolo 1914 e tivizas poellgor-leviañ an I.R.B. ober un emsavadeg a-raok dibenn ar brezel. E genver 1916 e voe merket deiziad an emsavadeg : a-benn Fask 1916 e ve. Fiziet e voe e Roger CASEMENT ober un droiad bruderezh er Stadoù Unanet hag en Alamagn. E gefridi a oa gounit digant an Alamanned kas armoù da Iwerzhon, sevel ur bezen iwerzhonat e-touez ar brizonidi vrezel, ha goulenn digant ar gouarnamant aleman anzav Iwerzhon evel bro dieub.

Prientet e voe an emsavadeg adal 1914. Er bloavezh-se e tizhe niver an dud en "National Volunteers" 180 000 den. E derou ar brezel e savas dalc'hidi an Daíl, John REDMONT en o fenn, evit ma'z afe Iwerzhoniz d'ar brezel skoaz-ouzh-skoaz gant ar Saozon. Goulenn a rae digant e emouestlidi eus strollad an "National Volunteers" mont el lu saoz. Diwar neuze e voe rannet ar strollad, ha savet gant ar vroadelourion un nerzh nevez, an "Irish Volunteers" (12 000 den). Eoin MAC NEILL a oa bepred ar rener, hogen renet e oa an urzhidur e gwirionez gant an I.R.B. Diouzh o zu e kroge izili ar "Citizen Army" da zeskiñ arverañ armoù. Goude e voent prientet gant taerded evit an emsavadeg; CONNOLLY a voe anvet da ezel e poellgor an I.R.B.

Evit abegoù bredoniell ha kadoniell e oa o soñj tud an I.R.B. en em sevel da sul Fask 1916. 3 000 den o doa e Dulenn, ha 13 000 er Rannvroioù. O raktresoù e oa kemer kreizenoù-buhez ar vro,

enkele'hiañ ar Saozon, hag embann ar Republik. Diouzh e du e nac'has CASEMENT kas e vezen da Iwerzhon, rak ne oa ket anat evitañ e teufe a-benn da zilestrañ. Ur vag alaman a zegasas armoù, hogen ar Saozon o doa bet stlennadoù a-zivout an dilestradur. Dre ma oa bet kemmet an deiziad anezhañ, hep ma oufe komandant ar vag, ne zeuas den ebet d'en emgav e Trelee. Dilestrañ a reas CASEMENT eus al lestr-spluj en doa e zegaset, ha douaret e voe an armoù en traezh. Siwazh e oa ar R.I.C. (Royal Irish Constabulary) d'an emgav, hag harzet e voe CASEMENT. Pa ouezas kement-se e tifennas Eoin MAC NEILL an emsavadeg prientet evit ar sul. Divizet e voe avat hec'h ober da lun Fask da gresteiz. War al lun e roas d'ar bezenoù an urzh d'en em vodañ a-benn dek eur. Hogen ne voe heuliet nemet gant un drederenn anezho. Graet e voe an emsavadeg evelkent, kemeret ar G.P.O., argadet Dublin Castel ha lennet diskleriadur ar Republik sinet gant ar seiz ezel eus poellgor al lu. Dre se e voe ar re-mañ tonket da vervel. Goude m'o devoe en em zaskoret d'ar Saozon, e voe fuzuilhet renerion an emsavadeg, ha kaset 1800 den da Vreizh-Veur, da gampoù-bac'h.

A-enep an emsavadeg e oa dre vras pobl Iwerzhon da gentañ, en abeg da vruderezh ar Saozon. Hogen pa voe dieubet c'hwec'h kant prizoniad e 1916 e voent degemeret gant engroezioù entanet. Kemmet a-grenn e oa bet emskiant Iwerzhoniz : ar rezid a vennent bremañ da gaout.

Goude 1916 e kreskas buan nerzh ar vroadelourion. Dilennet e voe ur c'hannad broadelour. Tamm-ha-tamm e voe gounezet gant ar republikaned un darn vat eus ar c'hadorioù. Ar gannaded dilennet a oa o freder mirout al lec'h en Iwerzhon.

E 1916, war gant pemp kador e voe seikont tri evit ar vroadelourion, c'hwec'h evit an "Home Rule" hag ugent c'hwec'h evit an unanourion. Diskouezet e oa splann faezhidigezh an emrenerion ha dale'hidi an Daíl.

Lekant ar bed da anavezout ar gouarnamant republikan goulennet gant ar bobl a oa preder ar republikaned. Ur gudenn all a save diouzh tu ar Saozon : mirout ouzh Iwerzhon a gaout ar gouarnamant-se. Bouzar ha dilavar e oa an ensavadurioù etrevroadel ouzh bruderezh Iwerzhon. Ne vane mui nemet implijout an nerzh : ren ar brezel-dieubiñ.

Bro-Saoz a roas da Iwerzhon an emrenerzh (Home Rule), evit mirout outi d'en em sevel adarre : savelet e voe un disrann darnel. Bro-Saoz a vroude Hanternoziz a-enep ar vroadelourion. Ret eo meizañ mat e tiwanas ar rannadur etre an Norz hag ar Su diouzh ar bruderezh graet gant ar Saozon. Krouet o deus etre protestanted ha katoliked un enebiezh ne oa ket anezhi a-raok. Klasket o deus "rannañ evit ren". Ne oa ket mui a zDaíl en Iwerzhon abaoe 1800. Met evel reizh ne felle ket d'ar gannaded vroadelour mont da Londrez, a vije bet anavezet renerzh ar Saozon war Iwerzhon. Ar c'hentañ kannad broadelour dilennet, ar C'hont PLUNKETT, a bedas ar gannaded iwerzhonat d'en em vodañ e Dulenn d'an 21 genver 1919. Ne zegemeraz avat respont ebet, na digant an emrenerion, na digant an unanourion. Padal en em vodas ar gannaded republikan e ti-kêr Dulenn, daoust d'al lu saoz. Savet e voe ur gambr anvet e gouezeleg "Daíl Eireann" (Daal pe Breudoù Iwerzhon). Evit an holl gannaded e oa bet savet Republik Iwerzhon adadek 1916, hag ar renadur reizh nemetañ e oa. Goulenn a rejont neuze ma'z afe kuit ar Saozon. Anvet e voe DE VALERA da levier an Daíl. Al luioù saoz ne rejont van ebet. Strolladoù ar rann-

vrcioù, dianzavet gant an Daíl ha gant ar Sinn Fein, a venne skarzhañ da vat ar Saozon diouzh Iwerzhon; leviet e vefe ar vro gant Iwerzhoniz. Savet e voe neuze an I.R.A. Derou ar brezel dispac'h e voe.

D'an 21 genver 1919 e krogas an argadennoù a-enep ar Saozon. Diskleriet e voe al lezenn-vrezel gant ar jeneral MAC READY, rener al lu saoz en Iwerzhon. En dilennadegoù e voe trec'h ar republikaned e pep lec'h, nemet e Beal-Feirste (Belfast). Atebif a reas Bro-Saoz dre dagañ Iwerzhoniz. Kroget e oa ar gerc'hvell.

E-keit-se ez ae da get tamm ha tamm an iwerzhoneg. Ur benveg alouberezh e oa bet ar skol ret. Talvoudus eo merzout e oa an urzhaz katolik a-du gant ar Saozon.

Yaouankiz Iwerzhon, dilabour, a enrolle el lu saoz evit gounit he buhez. Ouzhpenn-se e veze kenkizet ar vro gant un nerzh polis, ar R.I.C. Ar strollad-se, dre e spierion, a oa deuet a-benn da c'houzout pep tra. Ur brezel hollek e oa etre ar republikaned hag ar renerezh saoz en Iwerzhon e-keñver lu, diplomaterezh, mererezh hag armerzh. E-keñver diplomaterezh e voe ar bruderezh graet gant DE VALERA er Stadoù-Unanet; e-keñver mererezh e voe krouet ensavadurioù stadel iwerzhonat, lezioù-barn da skouer, evit kevezañ ouzh ar galloud saoz; e-keñver armerzh e savas Iwerzhoniz kevelourioù. Ar Saozon diouzh o zu a glaske paouraat Iwerzhon.

Pal ar bruderezh saoz a oa pellaat ar bobl diouzh ar republikaned, hag en Norz skarzhañ anezho. Michael COLLINS, penn gwazadur ar stlennerezh kuzh, a glaske diskar ar rouedad spierion strewet er vro a-bezh. War ar maez e veze taget ha dismantret an archeriezh saoz.

Meur a Iwerzhonat enrollet er R.I.C. a guitaas anezhañ kentoc'h eget lazhañ e genvroiz. D 1920 e voe savet ur strollad polis nevez gant ar Saozon : ar "Black and Tan", a renas ur mac'homerezh euzhus war bobl Iwerzhon. Er bloavezh 1920 e voe plantet an tan e Corcaigh (Cork) ganto. Lazhañ a raent ar republikaned, devif a raent o ziez; diskar a raent ivez ar greantioù, al laezhdiou. Gwaskañ a raent ar bobl. Ar spont a rene.

Unan eus palioù ar Saozon a oa rediañ Iwerzhoniz dilabour da zivroañ, ha dre se diskoulmañ ar gudenn, oc'h argas anezho eus o bro. Ur gwazadur arbennik e oa en I.R.A. evit mirout ouzh an dud-se a guitaat ar vro, dre rediañ ar bigi a zezouge anezho da zistrefi.

Anat eo avat ne c'halle ket an I.R.A. skarzhañ ar Saozon eus Iwerzhon. Galloudusoc'h e oant, padal ne oa spi ebet evit Bro-Saoz da ren ar vro, rak ar mererezh saoz a oa deuet da vezañ dic'halloud en Iwerzhon, dre dagadennoù diziwezh an I.R.A.

Ret e oa neuze kenvreutaat. D'an 25 mezheven 1921 e c'houlenn Lloyd GEORGE gant DE VALERA dont d'ur vodadeg a-benn divizout war ar peoc'h. Eleniañ a rejont o daou ar c'hendiviz adalek mezheven betek here 1921. Sinet e voe un arsav-brezel d'an 9 kerzu 1921. Hogen evit an I.R.A. ne oa nemet un arsav, ne oa ket ar peoc'h c'hoazh. Lloyd GEORGE a glaske lakaat Iwerzhoniz da blegañ d'e zivizoù : ar raktres kinniget gantañ a roe da Iwerzhon nebeutoc'h a frankiz eget d'un dominion, hag e redie Iwerzhon da zegemerout an disrenn. Dizarbennet e voe gant DE VALERA avat. Atebif a reas Lloyd GEORGE e vefe ar brezel; DE VALERA a zalc'has ha goursezet e voe ar c'hendiviz. Hogen un emvod all a voe d'an 10 here : Lloyd GEORGE a anzavas e oa eus ur vroad iwerzhonat.

DE VALERA ne gemeras ket perzh er breutaennoù nevez. Ur fazi e voe a zegasas d'ar brezel-diabarzh.

E-touez an dileuridi iwerzhonat e oa Arthur GRIFFITH, maodiern an Darempredoù diavaez, ha Michael COLLINS, maodiern an Arc'hant. Ur rektres a oa ganto, o nac'h anzav ar Roue evel rener Iwerzhon, hag o tisteurel an disrann.

Hogen e-doug ar mizvezh ma padas ar breutaennoù e spurmantas ar Saezon, diplomated kozh an holl anezho, e oa diz-emglevioù etre an dileuridi iwerzhonat : kostezennoù damenebet a oa en o zouez. Tennañ a rejont korvo eus kement-se o tistrannañ GRIFFITH ha COLLINS diouzh an dileuridi all. Merzet o doa e vije aes da lakaat anezho da blegañ : Arthur GRIFFITH ne oa ket republikan a hengoun. Ouzhpenn-se en em sante ereet gant ar gouestloù en doa graet d'ar Saezon. Michael COLLINS diouzh e du a gave dezhañ e c'halle heuliañ politikerezh an I.R.B. kentoc'h eget hini ar gouarnament iwerzhonat. E dalc'h ar Saezon e oa an daou zen, hag e tegemerjont o divizoù.

Dre Feur-Emglev 1921 e oa diskaret ar Republik ha degemeret an disrann. Diarbennet e voe ar rektres-se gant ar gouarnamant iwerzhonat. Ar Saezon a atebas e ranke Iwerzhoniz dibab etre ar Feur-Emglev hag ar brezel : an dileuridi iwerzhonat a gilas, hag e voe sinet an Emglev d'ar 6 kerzu 1921. An I.R.B. a c'houlennas digant e izili sevel a-du gant an Emglev. Darn vrasañ an I.R.A. evat a oa a-enep an Emglev. DE VALERA ivez a savas a-enep.

E genver 1922, war gant-ugent-daou gannad dilennet e oa c'hwegont-pevar evit an Emglev, ha pemont-seizh a-enep. Arthur GRIFFITH a voe anvet da rener ar Republik.

Evit ar republikaned n'o doa ket ar gwir an dileuridi da sinañ un emglev kent goulenn he mannos digant ar bobl. Pa voe bodet ar gambr nevez ne voe ket goulennet gant kannaded an Hanternoz dont. Ne oa ken Daíl Iwerzhon, met Kambr Kannaded ar Su.

An I.R.A. ne zegemeras ket an Emglev. D'an 9 ebril 1922 en em vodas ar renerion : distag eus pep strollad politikel e vefe an I.R.A., ha ne sentfe nemet ouzh ur renerezh dilennet gant ar bobl. DE VALERA diouzh e du a savas ur strollad republikan nevez : "Cumann na Poblachta".

War un tu arall e veze enrollet tud timat el lu gant ar gouarnamant da c'hortoz : emgannoù a voe etre al lu-se hag an I.R.A. Michael COLLINS a glasse ober eus ar Feur-Emglev pezh a felle dezhañ e ve, eleze ar c'hentañ kammed trema ar Republik. Savet e voe ur gevrat etre COLLINS ha DE VALERA; dilennadegoù a ve, hag e ve rannet al levierezh etre ar republikaned ha dalc'hidi an Emglev.

Kengomsoù a groge evit unvaniñ al lu; hogen ur bihanniver, bodet e lezioù-barn Dulenn, a savas a-enep, Liam LYNCH en o fenn : ne felle ket dezho kenvreutaat gant ar Stad dieub. Ober a reont o mennoz stourm an Hanternoz; eno e oa spontus stad ar republikaned : lazhet e veze broadelourion er straed, ha devet o ziez. Rektresoù ur Vonreizh nevez, a c'hellfe degemerout ar republikaned, a voe savet gant ar Stad dieub. Hogen ne venne ket ar Saezon degemerout ar Republik; adstunnañ penn da benn ar rektresoù a rejont : Bonreizh ar Stad Iwerzhonat a ranke hezañ degemeret gant ar Roue, hag ar gannaded a oa rediet da douiñ falded d'ar Roue.

Goude bezañ gwelet CHURCHILL e terras Michael COLLINS ar gevrat etre dalc'hidi ar Stad dieub hag ar republikaned : ne vefe nemet tregont-tri c'hannad republikan en Daíl, en doare ma chomfe ar renerezh gant tud ar Stad dieub. Dismantraig ar republikaned a voe diwar neuze pal ar Saozon. Kemer a rejont da zigarez lazhadenn Sir Henry WILSON, unan eus ar re a waske ar muiañ ar republikaned. An urzh a voe roet d'al lu saoz da gemer al lezioù-barn, penngarter al lu republikan e Dulenn. Dalc'hidi ar Stad dieub, o sentif ouzh ultimatom ar Saozon, a endalc'has neuze al lu republikan da loc'hañ diouzh al lezioù-barn. Nac'het e voe gant ar republikaned. Ar Stad dieub a grogas neuze da demnañ war al lezioù-barn. Kroget e oa ar brezel-diebarzh, a voe kriz-tre.

Dalc'hidi ar Stad dieub a arvere armoù saoz; kenlabourat a raent gant al lu saoz. Adkroget e oa ar brezel evel a-raok, nemet en em ganne bremañ ar republikaned a-enep Iwerzhoniz all.

An dud al lezioù-barn en em zifennas adalek an 28 mezheven betek ar 5 gouhere. Ken hir hag emsavadeg 1916 e voe. Cathal BRUGHA, penn republikaned al lezioù-barn, a nac'has en em reiñ hag e voe lazhet.

Ar Stad dieub a rene ur politikerezh a nerzh. Leun e oa ar c'harc'harioù a republikaned pe a dud kemeret evit republikaned.

D'an 12 Eost 1922 e varve GRIFFITH. Un nebeut devezhioù goude e voe lazhet Michael COLLINS; emgannoù a oa e-kichen Corcaigh war-dro Clonskilty. Deuet e oa da ensellout al lu. Lazhet e voe gant ur baged republikaned.

Kontelezh Corcaigh, kreizenn diwezhañ ar republikaned, a gouezhas en diwezh. D'an 27 ebril 1923 ez urzhias DE VALERA arsav ar brezel. Dibenn ar stourm e voe : diskaret e oa bet nerzh ar republikaned. Kalz taeroc'h eget ar Saozon e oa bet dalc'hidi ar Stad dieub. Krisoc'h eget ar Saozon e oa bet polis ar Stad dieub, war zigarez stourm a-enep an dizurzh.

E gouhere 1923 e oa 11 000 den en toull-bac'h. Mantrus e oa bet ar brezel-se evit Iwerzhon : tud eus an hevelep ti-eged a veze enebourion, hag en em ganne hep gouzout dezho. Diskaret e oa bet an armerzh.

Chom a rae bremañ da adsevel ar vro, ha d'hec'h unvaniñ en-dro. COSGRAVE, dilennet evel leviour ar Stad dieub goude marv GRIFFITH, a gloskas ren ar politikerezh-se. Degemerout a reas DE VALERA ar mennadoù-se, hag e teuas en-dro da Gambr ar Gannaded. Kuitaat a reas neuze ar Sinn-Fein : ar strollad republikan-mañ ne ansavo ket renerezh ar Stad dieub, na rann-adur Iwerzhon, ha n'en doa ket degemeret an arsav-brezel.

Ar Sinn-Fein hag un darn eus an I.R.A. a gendalc'has ar stourm. En enep e c'houlennas DE VALERA gant e dalc'hidi touiñ al le a fealded d'ar Roue. Sevel a reas neuze ar strollad "Fianna Fáil".

E 1932 e kemere DE VALERA ar galloud. E 1937 e voe krouet BIRE ha lakaet ul leviour e penn ar gouarnamant : Douglas HYDE e voe.

D'an 18 ebril 1949, tregont-tri bloaz goude Dispac'h 1916 e voe diskleriet Iwerzhon, ha ne oa ket mui evel un dominion. Dilennet e voe gant dalc'hidi ar Stad dieub.

Petra dastum eus kement-se ?

Da gentañ, er c'hantvedoù tremenet, ne savas nepred un enebadur bennak etre Iwerzhon an Hanternoz hag ar Su. Protestanted e-leizh a oa broadelourion. Gwelout a reomp ar Saozon o lakaat tamm ha tamm an enebadur-se da ziwanañ. D'ar brotestanted e lavarent e vefent mouget dinden ur renerezh katolik. Ur c'hleuz a vez toullet gant ar Saozon etre Norz ha Su Iwerzhon. Arabat kredañ e oa saoz tud an hanternoz evel ma klever alies. An darn vuiañ anezho a oa Iwerzhoniz protestant. Goude bezañ deuet a-benn da doullañ ar c'hleuz-se, gant ar pal da wanaat Iwerzhon, e klaskas ar Saozon lakaat an dizemglev da ren e-touez ar vroadelourion. O mennad a oa chom mistri en Iwerzhon gant skoazell an "Home Rule". E dalc'h ar Saozon e oa ar re o doa savet a-du gant ar Stad dieub : gant gouarnamant ar Stad dieub o sentiñ ouzh urzhioù Bro-Saoz eo e krogas ar brezel-diabarzh. Ar Saozon a c'halle lavarout ne oa ket int neuze a rae ar brezel en Iwerzhon, hogen Iwerzhoniz o-unan a'n em ganne etrezo.

Fa c'houezas ar Stad dieub ar brezel, ez anzavas DE VALERA renadur ar Stad-se. Nac'hañ a rae neuze e uhelvennad kentañ.

Daoust ma voe embannet ar Republik e 1949 gant ar re a oa a-enep e 1921, e nac'h bremañ c'hoazh an I.R.A. anavezout renerezh Dulenn. Evito e chom c'hoazh ar renerezh e dalc'h ar Saozon. Setu perak ez eo berzet bremañ an I.R.A. gant renerezh Dulenn, ha leuniet ar c'harc'harioù gant broadelourion.

Evit gwir, en enep d'ar pezh a greder alies, n'eo ket Iwerzhoniz a zo bet trec'h er brezel, met ar Saozon. En abeg

da se n'eo ket deuet a-benn Iwerzhoniz da seveniñ un dispac'h broadel gwirion, da unvaniñ ar yezh vroadel, da sevel ur Stad keltiek gwirion; hag e weler c'hoazh tud o kuitaat Iwerzhon evel gwechall, a-raok ma voe bet adsavet ar Stad.

Ar c'hentelioù a c'haller tennañ eus ar pezh a zo c'hoarvezet en Iwerzhon eo e tleer dieubiñ ur vro en he fezh, ha n'eo ket un darn anezhi hepken. Ha ne c'hell ket bezañ dieub ur bobl a gendalc'h da gomz yezh ar mac'homer. Arabat plegañ da zivizoù an enebour : un touell n'eo ken. Kadoniezhañ ar Saozon a oa klask gwanderioù Iwerzhoniz, a-benn o disrannañ ha bezañ mistri warno.

Ne c'haller ket chom a-sav e-kreiz an hent. Un emsav o stourm evit rezid ur bobl a rank kaout da bal nemetañ savidigezh ur Stad wirion ha dieub. Amplegañ a ra argas ar vac'homerion, ken e-keñver armerzh, ken e-keñver sevenadur. Hag an dispac'h a rank bezañ hollek, rak un hollad eo ur vro.

)) o ((

	MORELLE	1906	1923	
	SERRAND	1923	1949	COUPEL
SANT-BRIEG	COUPEL	1949	1961	
	KERVADOU	1961		
	GOURAUD		1929	
	TREHIOU	1929	1941	PICAUD 1925
GWENED	LE BELLEC	1941	1965	
	BOUSSARD	1965		
	LE FER DE LA MOTTE	1914		
AN NAONED	VILLEPELET	1936		

o ++ o

gwernegan

Arabat klask amañ ul labour klok. Un nebeut evezhiadennoù eo hepken.

Etre an daou vrezel, pezh a soñje dre vras, an eskibien, a gaver e levr Ar Voterez (Mouladurioù an Arvor, Fask 1935), p.19, Azgoulennoù Breizhek :

"Al lec'h a zo amañ, evit Breizhiz, da gomz eus o azgoulennoù breizhek. "Ar Vrestoned hag int-i o deus ar gwir da c'houlenn digant o c'hannaded "prometiñ e tifennint darveziou ar vroadelezh breizhek hag a harpint o "azgoulennoù reizh e Kamb ar Gannaded ?"

"Derc'hel a rankomp, kousto pe gousto, d'hor faiz, d'hor yezh ken kaer, "d'hor gizioù, d'hor gwiskamantoù."

En ul lec'h all, an Aotrou 'n Eskob DUPARC a ziskler ez eo ret deskiñ istor Breizh.

"An azgoulennoù-se a zo eta un dra reizh. N'eus anv ebet amañ a c'houlenn evit Breizh an emrenerezh pe an disparti (dishualded).

"Evidomp-ni e soñjomp a-unan gant Eskob unoret hag helevar Kemper ha "Leon "ez eo un dra vat evit Breizh bezañ staget ouzh Bro-C'hall".

"A-unan gentañ ivez e c'houlennomp ar gevatalded en hor frankizioù "broadel, dindan c'houarnament Bro-C'hall."

"M'hon eus ni ete an devez da zerc'hel da holl beadra hor broadelezh "breizhek, daoust hag ar re a zo oc'h ober evidomp e Kamb ar Gannaded "n'o deus ket int-i an devez d'ha mirout ha d'he difenn ma vez stourmet "outi ?"

"Ha krediñ a ray hor C'hannaded difenn a-unan gant an azgoulennoù "katalik azgoulennoù breizhek nemetken o c'hanvroiz ?

"Da vihanañ ar gwir hag an devez o deus d'henn ober."

Neuze e tleer difenn Breizh, met arabat eo goulenn an disparti ha zoken marteze, an emrenerezh. Eleze eo ret difenn al logodenn, met arabat lemel anezhi eus genou ar c'hazh, ha zoken, eus krabanoù ar c'hazh.

gwernegan

An Actrou 'n Eskob DUPARC e-unan a lavare : "Un dra vat evit Breizh eo bezañ staget ouzh Bro-C'hall".

Neuze, ma'z afemp pelloc'h, un dra vat e vefe ivez evit Bro-C'hall bezañ staget ouzh Bro-Rusia.

Lveljust, e vefe mat kaout liammoù etre ar broioù. Met peseurt liammoù ? Eno emañ en dalc'h.

An robout skouerioù da heul a zegaso sklerijenn a-walc'h.

En eskopti Roazhon, ar C'hardinal DUBOURG - ganet e Lognon Flougras - a skriva d'an Actrou PERRON en ul lizher eus an 21-12-1920 :

"Hetiñ a ran genadigezh eürus ha buhez hir da Feiz ha Breiz, emac'h
"e sell da lakaat embann e Roazhon. Ar sizhun diwezhañ ez eus bet e
"Roazhon bodadeg ar yaouankiz katolik, hag em eus goulennet digant an
"holl vrezhonegerion a oa eno ... deskiñ ha skignañ e yezh kozh ha
"stourm war en dachenn-se enep ar c'helennadurezhioù fall a zo oc'h en
"em silañ muioc'h-mui, zoken en hon touez.
"Ma hetoù eo e kavet lennerion dre vil, rak eno emañ mad ar vro ha
"silvidigezh Breizh."

Neuze e welomp e oa ar C'hardinal DUBOURG a-du gant Breizh.

Ar C'hardinal CHAROST a oa dedennet gant istor Breizh. Dirak 45 000 den, e Roazhon, d'ar 15-2-1925 e lavar :

"Pa oa Breizh en em zret da Vro-C'hall, he doa miret aviti he gwirioù
"hag he frankizoù kristen, evel Bro-Elzas".

Testeni an Actrou MOAL hon eus ivez da zevezh ar Bleun-Brug (Miz here 1925):

"An Actrou CHAROST a zalc'has hor c'hanneded gantañ e-pad un hanter-
"eurvezh hag a roas kalz meuludioù da labour ar Bleun-Brug, abalamour
"ma talc'h frankizoù hor bro Breizh ha dre se an iliz katolik ar un
"dro, hep klask en em zispartiañ diouzh Bro-C'hall."

Arrouezius eo ar frazenn diwezhañ : "Ma vije bet Paris ur
"greizenn a justiz hag a garantez, ne vije bet biskoazh kudenn ebet."

Met daoust hag-eñ eo fur klask bevañ hep distrujañ liammoù ar morv ?

An Actrou 'n Eskob GOURAUD, Eskob Gwened, a soñje kement-mañ, hervez ul lizher gant Yann-Vari PERRON (19-1-1926) :

"... an Actrou 'n Eskob GOURAUD, hag a zo bet levezonet gant diskler-
"iadurioù hon enebourion, a gav dezhañ e vez dedennet er Bleun-Brug, en
"un deare dipitus, gant mennozioù disparti."

An Actrou 'n Eskob TRENHOU, a zeuas war lerc'h GOURAUD, a ziskouezas mennozioù disheñvel. Meur a wech e tegouezhas dezhañ kempenn an traoù etre Eskob Kemper ha Yann-Vari PERRON.

A-boan anvet da eskob, e c'houlennas e vefe unvanet an doare-skrivañ. E 1937, e Bleun-Brug Flougestell, e lavaras ar c'homzoù taer-mañ a ziskouez anezhañ a-du gant Breizh :

"... Breizh a vev dre he zud a iliz ha dre he zud a stüdi, dre he zud
"a labour ha dre he zud a vor, dre he dornwezherion ha dre hec'h oberourion,
"dre he soniri ha dre he yezh, dre he ziegezhioù ha dre he skolioù, Breizh
"a vev, dre m'he deus gwir da vevañ, hag an nerzh-se a gav en he feiz, rak
"ar feiz eo ene Breizh..."

"Da gentañ, bremañ 'z eus dek kantved, piv a ziskaras Breizh ? An dud
"difeiz, an Normaned; Breizh a seblante bezañ marv. Marv da virviken ?
"Nann, va breudeur, rak elfenn he buhez a oa kuzhet e kreiz kalon un den
"santel, an Abad Yann.

"Un deiz, goude ur badenn gredus, an Abad Yann a Landevenneg a drauzas
"ar mor hag e zegouezhas e Londrez, dirak an Dug Alan : "Dug, penaos e
"c'hellit-hu tremen emañ ho yaouankiz p'emañ gwasket ho pro, evel m'emañ ?
"Salc'hoit hirvoudoù ho proudeur o tonat war an avel. D'an emgann, Dug Alan,
"d'an emgann, evit Doue ha Breizh.

"Marteze, ma breudeur, e kredit ez eo an istor-se gwell gozh. Ha kouls-
"koude ar pezh a c'hoarvezze er bloaz 937 a dremen c'hoazh dirak hon daou-
"lagad.

"Piv a glask hiziv diskar Breizh ? An dud difeiz.

"A drugarez Doue, e kaver c'hoazh, e Breizh-Izel, tud a feiz da stourm
"a-enep mevelien an droukaped. Silvidigezh ar bobl a zo etre ho taouarn.

"Ma fell d'an dud difeiz mastariñ da yaouankiz dre c'hizioù mezhus, sav
"da benn, o Breizh, ha torr chadenn an ifern.

"Ma fell d'an dud difeiz dispenn an tiagezhioù dre lozennoù dialeal,
"sav da benn, o Breizh, ha torr chadennoù an ifern.

"Ma fell d'an dud difeiz flastrañ ar pardonioù, diskar ar c'hroazioù,
"dismantreañ an ilizoù, sav da benn, o Breizh, ha torr chadennoù an ifern.

"Ma fell d'an dud difeiz herzel ouzh ar veleion da brezeg an Aviel e
"brazhoneg, sav da benn, o Breizh ha torr chadennoù an ifern.

"Ha c'hwi, Breizhiz Goalo ha Treger ha Leon ha Kerne ha Gwened,
"difennit hor yezh, yezh ar varzhed, yezh ar sent, ha komzit, kanit,
"lennit, skrivit, deskit, harpit, strewit ar brazhoneg. Ha Breizh a vev.

"Ha ra vezo fael, da virviken, ene hor bro garet, douar al lealded
"hag ar frankiz, douar ar wirionez hag ar fiziañs, douar ar sent, douar
"Santez Anna, douar an Itron Varia, douar Jezuz hor Salver."

Bennozh d'an Aotrou 'n Eskob TREHIOU, evit seurt komzoù
a zo un dudi evit Breizhiz ha kristenien.

En eskopti Sant Brieg e kaver an Aotrou 'n Eskob SERRAND,
den a galon. Marteze n'en doa ket mennozioù taer, met karantez
evit an dud, karantez evit Breizhiz. Morse n'en deus
klasket diskar tud an Emsav, ha karantez en doa evit tud
evel DIR-NA-DORR. E Bleun Drug Gwengamp 1925 e lavar :

"Ar wirionez zo ganeoc'h, pa zifennit a-gevret gwirioù an Iliz ha
"gwirioù Breizh. Kit war-raok ha war-seun. N'eo ket Eskob Sant Brieg ha
"Landreger hepken a zo a vennozh deoc'h, met an Iliz Santal zoken."

En eskopti Kemper e weler darempredoù diaes a-walc'h
etre an Aotrou 'n Eskob DUFARC ha Yann-Vari PERROT.

Dre vras Eskob Kemper en deus doujañs ha karantez evit
Yann-Vari PERROT, ha meur a wech en deus difennet anezhañ,
zoken dirak beleion all. Met ne gompren ket kudenn Vreizh,
ha komz eus emrenezh a zo evitañ pec'hed ha follentez.
Karantez en deus evit yezh ha gizioù Breizh. Evitañ eo kudenn
Vreizh houmañ : ret eo difenn al logodenn, hogen ret eo ivez
lezel al logodenn etre krabanoù ar c'hazh. Karantez en deus
evit al logodenn, met karantez vrasoc'h c'hoazh evit ar c'hazh.

Kement-se a weler splann el lizher kaset d'an Aotrou PERROT
d'an 10-4-1926 :

"Aotrou PERROT ker,

"Keuz am eus bet, a welout n'hoc'h eus ket taolet pled ouzh gourc'hemenoù
"hoc'h Eskob.

"Setu perak am eus difezet an dra-mañ : ret eo deoc'h an amzer-da-zont,
"diskouez d'an Aotrou Chaloni UGUEN an holl bennadoù-skrid a vo savet evit
"ho kelac'henn.

"Gant ho mennozioù disranner, hoc'h eus degaset disfiziañs a-keñver kud-
"ennoù Breizh, ha torret an unvaniezh etre ar veleion hag ivez tud yaouank
"vat an eskopti.

"Gant ar bruderezh a rit bremañ, a vez luziet, hep gounid ebet, stad ar
"religion e Breizh, ha lakaet an arvar ar pezh a c'houlennomp ni kristenien,
"o rsiñ abegoù d'hon enebourion da heskinañ ac'hanomp.

"Gouzout a rit, endao, ne c'hello hor rannvro, evit pezh a sell ouzh ar
"frankizioù rannvroel, gounit netra en tu all d'ar pezh a c'hallfe bezañ
"roet d'ar rannvroioù all, ha n'oc'h ket evit soñjal, spi am eus, e fall
"d'ar rannvroioù-se en em zispartiañ diouzh Bro-C'hall.

"N'eo nemet gant gwad ha rivinoù e taufac'h a-benn da zispartiañ Breizh
"diouzh Bro-C'hall.

"Ne fell ket deoc'h bezañ unanet gant Bro-C'hall ? Dalc'hit soñj e vefe
"ur Vreizh distag c'hoantaet diouzhtu gant Bro-Saoz, ha gwashoc'h c'hoazh,
"gant Bro-Alamagn.

"Setu petra c'hoarvezfe gant ho mennozioù hufvrael. Gwelloc'h hoc'h eus
"d'ober, gant ho tonazonoù, ho kalon hag hoc'h ene e vev : adkemer doaroù-
"ober fur, da lavarout eo, difenn ha gwellast spered Breizh, ar feiz, ar yezh,
"gizioù Breizh, istor Breizh. Ha dalc'hal soñj eo bet krouet ho kelac'henn,
"da gentañ ha dreist-holl, evit difenn ha skignañ ar feiz."

Pemsek vloaz goude, e 1941, Bro-C'hall a zo stag ouzh Bro-
Alamagn. Daoust hag en deus Eskob Kemper lavaret da resistañtad
Bro-C'hall : "N'eo nemet gant gwad ha rivinoù e taufac'h a-benn da zispartiañ
"Bro-C'hall diouzh Bro-Alamagn. Ne felle ket deoc'h bezañ unanet gant Bro-
"Alamagn ? Dalc'hit soñj e vefe ur Vro-C'hall distag c'hoantaet diouzhtu
"gant Bro-Amerika, ha gwashoc'h c'hoazh, gant Bro-Rusia."

Ar gudenn gentañ evit an Eskob eo difenn ar feiz. Met petra

eo ar feiz ? Un doare mennoz kuzh e diabarzh an den a c'hellfe bezañ, hep talvoudegezh ebet evit diluziañ kudennoù ar bed. Neuze emañ ar wirionez gant al lañked a lavar ez eo ar feiz un dra brevez, un dra a zo kuzh e kalon an den, ha netra ken, pe c'hoazh gant ar gomunourion a ziogel ez eo ar feiz opiom ar pobloù. Arabat eo neuze difenn ar gristenion. Ha ma teu an diaoul da vezañ mestr e vo ret sentiñ ouzh an diaoul, en anv Doue. Ar feiz a c'hellfe bezañ ivez ur sklerijenn a-berzh Doue, evit trec'hñiñ war ar gaou hag an direizhder. Karomp Doue da gentañ neuze.

Met houmezh eo an trec'h hon eus gounezet war ar bed : hor feiz. El lizhiri-meur e lenner ez eo ret krouiñ ur bed nevez, diazezet war an urzh naturel, ar justiz hag ar garantez.

Eno emañ an dalc'h.

"Ar politikerezh a zo deuet da vezañ pep tra. Ober politikerezh a zo "ret evit ar garantez neuze, ha n'eo ket ober politikerezh evit ober politikerezh, met evit saveteiñ an dud ha gant armoù ar sklerijenn" eme Yann-Vari PERROT.

An Aotrou 'n Eskob DUPARC e-unan a lavare : "Ma a zo ur "Cheun trec'het".

+ + +

Emzalc'h ha memnozioù an eskibien e-pad ar brezel a vefe danvez ur studiadenn a bouez n'on ket mennet da ober emañ. Arabat evelato ankounac'haat kement-mañ : Eskob Kemper a ziskouez disfiz ouzh tud an Emsav; ar sakramantoù a zo nac'het ouzh izili ar P.N.B. Sk. : An Vro 36, p.2 :

"Kristen a galon ha breizhad a galon ma oa Yeun AR GOWW, ne oa evitañ "netra krisoc'h, netra pönusoc'h eget trubarderezh ar veleion e-keñver "Breizh hag he yezh. Frenlat oa bet gant skouer an Aotrou PERROT. Met

6

"ivez pa c'hoarvezas gant an Aotrou 'n Eskob DUPARC soñjal e oa ret, evit "ar silvidigezh (peurbadel marteze), sentiñ ouzh Vichy ha pa fellas dezhañ "nac'hañ ar sakramantoù ouzh izili ar P.N.B., en em gavas Yeun AR GOWW, of "kristen a galon, lezet a-gostez evel ur c'hi, an e iliz parrez."

Yann-Vari PERROT a zo saludet evel "brogarour Frañs", goude bezañ bet lazhet ken kriz d'an 12-12-1943.

Ha koulskoude e kavomp e gourc'hememoù diwezhañ an Aotrou PERROT (2 pe 11 gouhere 1918) ar gerioù-mañ :

"Evit Doue ha Breizh am eus difennet a-doug va buhez eo e varvan e bro "ar C'hallaoued. Mervel a ran evit brasañ gloar Doue ha Breizh.

"Va brasañ youl a-rack mont diwar an douar-mañ a oa gallout gwelout va "bro, adalek Roazhon tre betek Lokmaza Penn ar Bed, ruizhet a-nevez evel "gwec'hall gant ar Vretoned ha gant ar Vretoned hepken. Pap dan mestr en "e bal, pep pobl mestrez en he bro.

"Droug bras o deus graet ar Seozon d'hor gouenn an amzer dremanet. "Muic'h a zroug o deus graet ouzhip c'hoazh ar C'hallaoued er pavar c'hantved diwezhañ-mañ, ha dreist-holl en tregont vloaz emomp o paouez "gwelout tremen.

"Gwirioù Breizh evel gwirioù pep bro a zo sakr ha ne c'hallont ket bezañ "mouget, nemet mougañ a rafed da gentañ an holl Vretoned.

"Santez Anna, mamm-gozh hon Salver Jezuz Krist, mamm ar Warc'hez, ha "mamm hor bro, benniget ho Vretoned ha grit ma vevo Breizh da virviken."

An evezhiegezh a ren, met kuit a enebiezh e Gwened ha Sant-Brieg.

An Aotrou 'n Eskob LE BELLEC, Eskob Gwened (12-12-1941) a oa mignon bras P.M. LEC'HVIEN, Person Kemper-Gwezeneg.

E Sant-Brieg an Aotrou 'n Eskob SERRAND n'en deus nac'het biskoazh ar sakramantoù ouzh izili ar P.N.B., hag an Aotrou BROCHEN, Vikar Vras, en deus lavaret kalz evit Breizh.

+ + +

Goude ar brezel e soñjer a-zivout Breizh e vo kaset da get - hag eo ret e vefe kaset da get - a-raok ugent vloaz kement tra vreizhek : ar yezh, ar gizioù, ar pardonioù, ar pedennoù.

Ur froud a gasoni enep Breizh a verker neuze, evel ma vefe marv Breizh un dra santel; hag ar veleion da heul.

An eskibion, diouzh o zu, n'int ket a-enep krenn, hag a-wechoù ez int a-du gant Breizh.

Abati Landevenneg, da skouer, a zo adsavet. Ar pal a zo pediñ ha labourat evit Breizh.

En abeg da Yann-Vari FERROT, eskibien 'zo a zo deuet war evezh.

E 1954, evit pardon Santez Anna, Breizh a zo gouestlet d'ar Werc'hez gant ar C'hardinal ROQUES. Neuze n'eo ket bet ankounac'haet Breizh er pedennoù, pesh a zo talvoudus dija.

Pedal an eskibien n'int ket taer; ar c'hiz a heuliont, hep ober kalz tra.

Ar Sknouted Bleimor a zo diskaret e Kloerdi Kintin.

E kemennadenn an eskibien war al liderezh e lenner :

"Ret a vo bezañ doujus avit en dud, soursial oute evel pastored vat, "ha klavout ar bihanniveroù.

"Er parrezioù e-lec'h ma vo lidet meur o oferen, e vo tu, hervez an ezhermoù, da lavarout unan penn-da-benn gant ur yezh hepken, an eil pe eben."

Hogen kement-se n'eo ket heuliet strizh, hag e-barzh

Ar Vro 33, p.2 e kaver un heklav eus diaesterioù tud Ouezeg : 27 a dud o deus goulennet e derou ar bloaz, digant an Aotrou GUILLERM, Ferson Gouezeg, brezhoneger, lidañ e brezhoneg unan eus div oferen ar sul. Yeun AR GOW e-unan en deus goulennet skoazell digant Eskob Kemper evit an dra-se. Gweladennoù e-

leizh a zo graet, lizhiri e-leizh a zo kaset, met en ener.

E Roazhon a-hend-all e vez kaset ul lizher d'an Eskob d'ar 6-5-65, evit goulen ma vefe kendalc'het da lidañ an eil oferen e brezhoneg pep miz.

Lizher Arc'heskob Roazhon :

"Abaoe un nebeut amzer em eus resevet un niver a lizhiri o deus lakaet "ac'honor da deural pled ouzh kudenn ar vrezhonegerion e Roazhon. Fallout "a rafe d'an holl kaout, e Roazhon, un eil oferen viziek e brezhoneg. "Da veur a hini, zoken, e fellfe kaout un oferen seizhuniek.

"Ur c'hendiviz am eus bet, n'eus ket pall, a-zivout an dra-se, gant "holl Eskibion Breizh. Souezhet bras on bet o welout ne oa oferen vrezh- "onek ebet e kêrioù Breizh, nemet e Gwangamp, lec'h ma vez lidet un oferen "viziek war c'houlenn ur vrezherzh vreizhat. E Kemper ivez ez eus, hervez "am eus klevet, ur c'horsiz o brezhoneg. Ret eo din, neuze, merzout e tsuit "holl eus kornioù-bro ne vez ket graet eno gant ar brezhoneg evit al lidoù.

"Ma 'gav souezhus a-walc'h e soñjit ober eus Roazhon a zo e-kreiz an "departamant ma ne vez ket komzet brezhoneg, ur greizenn a vrezhonegerion.

"Koulskoude ez eus abegoù pouezusoc'h da lavarout "nann". Un dever eo, "evit ur c'hristen, en em wriziennañ don er vro m'eo bet lakaet enni gant "rangevezh Doue. Ho plas a gristenion zo, eta, e-barzh ho parrezioù, hag "evit resev hag avit reiñ. Er mare ma fell d'an Iliz bezañ d'ostalskoc'h "aget biskoezh, ne vefe ket brav deoc'h chom ganeoc'h hoc'h-unan. An dra- "se a lavaran dreist-holl evit ar studierion a gavo e parrez ar studierion "hag eno hepken kelennadurezh an Iliz o deus ezhomm hag e vo lakaet a live "gant ar gelennadurezh vedal a vez rost dezha. D'an dud yaouank-se dreist- "holl, eo ret ober abostolerezh e-touez o c'hensudierion.

"Kerent 'zo, ivez, hag e fellfe dezha kaout evit a bugale ur galennad- "urezh kristen e brezhoneg. Kement-se a zo, d'am soñj, ervarus maubet evit "dazont ar feiz en o spezedoù. Market em eus gant penn-galon neuspel tud "eus Bro Euskadi, boos da lidoù en euskareg, hag a chome hep mont d'an "oferen ur wech ar-maez eus o bro. Krog adarre, evelkent, pa vezent distro "un nebeut devezhioù pep bloaz. Met e gwirionez ne oa tamm ebet a buhez "stok ouzh hini o farrezioù nevez, o vezañ ne oa ket eno ar pezh o doa "gwelet e-pad o bugeliozh e Bro Euskadi - tra dic'hallus da gavout dra-holl. "Hevelep tra a c'hoarvezfe a-raok pall evit ar re yaouank, ma pligfen hizi "dirazoc'h. Kavout a rafe din, eta, mont enep va dever, oc'h ober komant- "se.".....

(12 linenn amañ o tisplegañ n'eo ket kudenn ar vrezhon-egerion heñvel ouzh hini ar souderded pe an estrañjourion).

"Erfin ez eo bet degaset d'am soñj, gant darn ac'hanoz'h, pannedoù tennet eus Pacem In Terris diwar-benn ar bihanniveroù e-keñver ar ouenn. "D'ar re-se e respontin n'o deus menget nemet darn eus ar pannedoù-se. "Dez' ez eus, en tu all d'an niverennoù 95 ha 96, an niverenn 97, talvoudusoc'h e'hoazh, rak e hirder, eget an daou all a-gevret. Hag an niverenn-se o lavar kement-mañ : "Keulskoude e vo taolst plad ouzh an dra-mañ : degouzhout a ra d'ar bihanniveroù, pe en abeg d'o zekad "kriz, pe en abeg d'ar poanioù o deus gouzefvet, mont re bell ha lakaat "o fersonalezh a-us d'an talvoudgezhioù hallvadel, evel pe vije ret "lakaat mad ar bed holl dindan hini o bro."

Me 'gav din n'eus ket da rebech ouzh ar Vrezhonned mont re bell, nemet marteze war-du ar basianted hag ar sioulder.

Pal Breizh a zo lakaat pep tra en e blas, en em zieubiñ diouzh liammoù ar marv evit bezañ bev ha digor d'an holl.

Pal Bro-C'hall a zo distrujañ kement tra n'eo ket gall, en em zispartiañ evit bezañ hec'h-unan ha displezañ ar bed holl. Gant piv neuze e vez lakaet mad ar bed dindan mad ar vroad, ma n'eo ket gant ar C'hallaoued o-unan ?

En Ar Vro 28, p.28, e lenner :

"Ar Gelted, disheñvel kreñn diouzh al Latined, ha dedennet gant an "traoù kevrinus, berz ha taer o zenz-spered, a roas d'ar bed embleustrerion dreist hag a voe misionerion dispar. Levezon al Latined a voe "distar en o zouez, hag amañ en o lidoù, en o feiz doueoniell, ur spered "disheñvel a-greñn. Ganto e oa dic'hallus e taufe Keoded Doue, evit komz "evel Sant Augustin, da vezañ un dra douezul, un dra korfek, ma fall "deoc'h, ha netra ken. Flestradur ar Gelted gant ar Saozon, ha goude "gant ar Franked dreist-holl, a zo bet e gwirionez ur gwalldaol spontus, "ken ma voe distrujet kempouez relijiel broadoù ar Sav-Heol". (Tennet eus levr G.H. BORNVAUD : Le Schisme de 1054, p. 54)

Feiz ha Breizh, a lavare an Aotrou PERROT. Feiz kentoc'h eget Breizh a soñje an Eskibion dre vras, ma ne oa ket da gentañ Bro-C'hall, merc'h henañ an Iliz. Met ne c'heller ket kavout ha karout Doue hep kavout ha karout an nesañ. Hag evit

Breizhiz, n'eo ket Paris an nesañ, Breizh ne lavaran ket.

Gwashoc'h a zo avat : deoust da bep tra ez a ar feiz da goll. Feiz hep Breizh ? Hogen ar feiz ivez a zo o vont kuit.

"Bro-C'hall, eme an Aotrou beleg RICHARD, a zo daet da vezañ ur mekanik "da vougañ ha da lazhañ ar feiz." (France, Pays de mission ou de démission ?)

Neuze e welomp pegen start eo memnoz an Aotrou PERROT, Feiz ha Breizh : feiz hep Breizh a dalvez feiz goulo. Rak goulennet eo gant ar feiz karout Doue, karout an nesañ, da lavarout eo Breizh. Arabat e vefe karout Breizh evel un doue faos - ar pezh a zo gwir ivez evit Bro-C'hall - met ret eo karout Breizh evel bro garet gant Doue.

)) o ((

Lun 08 Eost 1966

I S T O R

Y e u n G O U R V E S

D I S K L E R I A D U R P O N D I V I

N'eo ket va fal ober amañ istor an Emsav e-pad ar brezel, pa na vefe nemet un diverradur. Fellout a ra din burutellañ an diskleriadur kinniget e Pondivi gant Kuzul Broadel Breizh. Dav eo din taolennañ aergelc'h ar mare-se.

Fa darzh ar brezel ned eo ket roet gant rennerion an Emsav broadel an urzh d'en em sevel hervez ar rektresoù a oa bet prientet. Kouezhet eo pounner an heskinerezh war ar vroadelourion. Met dibabet eo na respont dre an armoù. Marteze evit diwall na vefe kavet un digarez da lazhadegañ an emsaverion.

Berz a vez lakaet war ar gelaouenn Breiz Atao ha war ar Strollad Broadel. Un darn vat eus an emsaverion a ya en harlu : MORDREI ha DEBAUVAIS a ya da chom da Vro-Flandrez. LAINE a ya da soudard. Gwalarn a baouez da vezañ embannet. Dihunamb gant Loeiz HERRIEU ha Feiz ha Breiz gant an Aotrou PERROT a zeu c'hoazh er-maez.

yeun gourves

Un digarez a gaver er brezel hag el lezennoù savet e skeud ar brezel evit klask mougañ da vat an Emsav breizhat. Eus Brussel 'hag eus Bro-Flandrez e kas DEBAUVAIS ha MORDREL galvadennoù d'ar Vrezhoned er gazetennig Quest Information.

Gervel a reont ar soudarded vreizhat da zilezel an arme c'hall ha da chom hep stourm. Diouzñ an tu all e klaskont gounit ar renerion alaman da vennoz ur Vreizh dieub. Met hep kalz a verzh o vezañ m'eo pal ar politikerezh alaman darbar ar vignoniezh etre Frañs hag Alamagn.

D'an 10 a viz mae 1940 e krog war dalbenn ar c'hornog an argad bras alaman er penn anezhañ armeadoù hobregonet ar jeneral GUDERIAN. Un nebeut sizhunioù goude n'eus ket mui a Frañs. Distreiñ a ra DEBAUVAIS ha MORDREL da Vreizh. Daoust hag embannet e vo ar frankiz ? Ar prefed en e vurevioù e Roazhon a c'hortoz ar mare da reiñ ar galloud d'ar vroadelourion vreizhat. Met ne vo ket dieub Breizh, dre m'eo degouezhet DEBAUVAIS ha MORDREL e Roazhon gant ar soñj gortoz an arsav-brezel evit embann ar frankiz. Unan eus penneñ divizoù an arsav-brezel (24 a viz mezheven) a zo e vo doujet da unded Frañs gant Bro-Alamagn.

KUZUL BROADEL BREIZH

D'an 3 a viz gouhere 1940 ez eo galvet ar Vrezhoned vro-gar d'en em vodañ e Fondivi. Daoust hag embannet e vo frankiz Breizh evelkent ? An deiz a-rack eo bet galvet DEBAUVAIS ha MORDREL gant un ofisour uhel alaman en deus displeget dezho e savfe an Alamanned a-enep kement embregerezh a lakefe en arvar divizoù an arsav-brezel. Goulenn a reer diganto zoken chom hep komz eus pad Vreizh hag eus broadelezh. Evel reizh

e nac'hont plegañ met ne c'hellont ket kemer riskl un emgann digor gant an Alamanned. Sevel a reont e Fondivi Kuzul Broadel Breizh a zo ennañ DEBAUVAIS, MORDREL, GUIEBESSE, LAINE. Gervel a reont pobl Vreizh da zibab he frankiz. Sevel a reont ar gazetenn sizhuniek L'Heure Bretonne hag ur pennadig goude ez adsavont Strolled Broadel Breizh.

DISKLERIADUR FONDIVI

Embannet eo bet an diskleriadur-mañ en ul levrenn divyezhek. Diazezet eo bet ar mennozioù e galleg moarvat ha troet e brezhoneg goude.

Me gav din ne c'haller burutellañ seurt diskleriadur nemet e-keñver an istor, ne c'haller ket heñn ober e-keñver mennozioù, da lavarout eo ne dalvez ket seurt diskleriadur evidomp-ni nag evit hor mare.

I.-"Kuzul Broadel Breizh a lavar, en anv pobl Vreizh, ne c'hallo, "e nep degouezh, stad Breizh bezañ goude ar brezel an hevelep "hini hag a-rack. Ar c'henreizhadur a varne Breizh d'ar marv "a zo dismantret da viken hag an holl reolennoù m'oa diazezet "warno a zo kouezhet en o foull."

E gwirionez an urzh c'hall a chom e Breizh : e seurt rev-eulzi n'eo ket framm ar Stad a vez kemmet met peurliesañ ar renerion. Zoken e-pad ar brezel n'eo ket distrujet ar veli c'hall, chom a ra gall ar mererezh daoust d'an dalc'herezh alaman. E gwirionez an Alamanned ne raent van eus Emsav Breizh, ne oa dezho nemet ur benveg evit pouezañ war ar Stad C'hall. En em douellañ a ras an dud o krediñ e tegasfe ar brezel diskar Bro-C'hall.

II.- "Kuzul Broadel Breizh, kannad ar Vretoned a zo damant "dezho da vad ha da enor o fobl, a oberio, d'an eur dilennet "gantañ, evit reiñ da Vreizh ur renerezh-stad broadel, a vo "diouzh he frammedur-natur ha diouzh roudenn he henvoazioù, "evit ma c'hallio Breizh erfin bevañ evel ur vroad kerreizhet, digabestr en he mennadoù ha perc'hennet war he madoù."

An darn-mañ eus ar skrid a zo mat a-walc'h. En em zis-kouez a ra an izili evel broadelourion. "digabestr en he mennadoù", da lavarout eo nann levezonet gant mennozioù an estren. Aze e c'hallan menegiñ an U.D.B. en deus kemeret stumm un emsav eus ar gostezenn gleiz gall. "ha perc'hennet war he madoù". Dre se e c'haller soñjal en ur seurt sokialouriezh.

III.- "Reizhadur ar Stad Vrezhon, nac'het gantañ ar boazioù a "zizurzh hag a zisleadet kevredigezhel o deus kaset Bro-C'hall da goll, a vezo spredet gant ar pennoelennadoù-mañ :

"- Breizh da Vreizhiz.

"- Mad kumuniezh Breizh da bennlezen dreist da emzant an hiniennoù.

"- Unvan, Kret ha Dizalc'h ar Renerezh."

Fa brienter ur fram politikel e studier peurliesañ ar fazioù a zo bet graet en a-raok. Er pennad ne glaskont ket di-elfennañ ar c'hwitadennoù a zo bet graet e Breizh na termenañ un daclerezh dispac'hel reizh. Met kement-se a zo ivez arouez al laoskentez a rene en Emsav politikel er mare-se : gortoz un darvoud a vefe deuet eus an diavaez. (Ur fazi grevus a gaver alies en hon istor eo hennet : gortoz un diskoulm estren evit kudenn Vreizh. Bewech en deus degaset ur c'hwitadenn.)

"Mad kumuniezh Breizh da bennlezen dreist da emzant an hini-
"ennoù.

"Unvan, Kret ha Dizalc'h ar Renerezh."

Kement-mañ a endalc'he n'he dije bet Breizh nemet ur atroll-
ad politikel hag aze e c'hellomp soñjal e skouer MUSSOLINI.

IV.- "Reizhadur etrevroadel ar Stad Vrezhon, hag he darempredoù
"gant Bro-C'hall hag Alamagn a vezo divizet dre feurioù diwar
"emglevioù savet e pep frankiz en hentoù digoret gant urzhadur
"nevez ar bed."

Klask a reont termenañ ur politikerezh etrevroadel. Aze
e gwirionez e kendalc'hont da faziñ war emroadur ar bed.
Klask termenañ ur politikerezh etrevroadel a zo evito klask
termenañ Breizh.

V.- "Er brezel a gendalc'h ouzh penn-aotronezh Bro-Saoz, e
"lavar pobl Vreizh emañ a wir galon a-enep enebour kozh ar
"Gelted."

Al lodenn-mañ eus ar skrid a c'haller displegañ seun-tre :
ne vefe ket bet embannet an diskleriadur hep un dra bennak a-
du gant an Alamaned. Met furoc'h e vije bet enebiz ouzh an imp-
alaeriezhoù dre vras.

VI.- "Kuzul Broadel Breizh a zo engortoz ma welo aplann an holl
n'hon eus nemet berr-amzer evit dont d'ar pal, hag e raio pep
"hini diouzh kas buan da benn-vat al labour a zigoromp hiziv
"dre zegas dizant er stourmad e nerzh-korf, e youl hag e vadoù.
"Ret, ouzhpenn, bezañ tud a benn ha sentus ouzh ar reolenñ."

Sklaer eo al lodenn-mañ eus ar skrid. Goulennet e vez
digant an emsavetion en em unañ hag en em urzhiañ.

Heuliet eo an Diskleriadur gant ur Roll Mennadoù a dermen resisoc'h mennoziou ar Strollad.

ROLL MENNADOU

1.- "Pobl Vreizh a zo anezhi ur gumuniezh e-keñver ar ouenn, "ar spered, ar renerezh-stad, ar gevredigezh hag an arboellerezh."

Alese ne vefe nemet ur strollad politikel.

"ar spered" n'eo ket gwerinvelour mat war un tu all n'eus ket e Breizh a strollad politikel gwirion c'hoazh, n'eus ket a vennoziou termenet mat, n'eus ket a zarvez framm stad er mare-se.

Pep mennoz a zo ganet diwar vennoziou estren treuzwisket. Breizh he deus ezhomm eus diskoulmoù a glotfe outi, ne c'heller ket lezel ur vro nevez digor da vennoziou estren dezhi, a-hend-all ez adkouezher en dangerezh, da lavarout eo e teu stad ar vro da vezañ heñvel ouzh an hini rakdispac'hel.

"ur renerezh-stad" : ur Stad kreñv ha frammet he dije gallet bezañ savet gant ur gelennadurezh reizh da ziazez dezhi. (Ar mennoziou ganet e-ser un dispac'h broadel a zo ar re efedusañ evit sevel ur Stad.)

Gwak e chom ar Stad raktreset en Diskleriadur. (Da skouer evit klenn ar yezh a welimp pelloc'h e chome diboll).

"ar gevredigezh hag an arboellerezh" : n'eus nemet raktresoù dispis a-zivout an armerzh. Evit ar gevredigezh, meizañ anezhi evel un dra unvan n'eo nemet un digarez evit ober gant ur strollad politikel hepken.

War ar gudenn ne c'hell den diouganañ. Hag-eñ he devo ar Stad Vrezhon ur strollad politikel pe meur a hini ?

2.- "E kumuniezh ar bobl emañ ar veli. Stag eo dileadoù ha gwirioù pep Breizhad ouzh mad ar gumuniezh."

Kement-se a zo unan eus mennoziou brudetañ an dispac'h gall.

3.- "Diazevadur ar Stad Vrezhon hag adsavidigezh Bro-Vreizh a c'houlenn strizh renerezh ur pennadur kiriek eus e renerezh.

"Ar penn-pobl, skoaziet gant ur c'huzul, a gas da vat "youl ar bobl, a-unvan gant bodadoù-tud, anezho dileuridi eus nerzhioù bev ar bobl."

Penn ar vro a vije bet fiziet en un den kentoc'h eget en ur strollad. (E-giz ur "führer" pe un "duce").

Pa gomzont diwar-benn ur gambr dileuridi eus nerzhioù bev ar bobl, e c'hellomp soñjal e kamb ar micheroù a zo bet krouet en Italia war-dro 1938, hag he deus kemeret lec'h kamb ar gannaded.

4.- "Pep Breizhad dallezek a vezo galvet da gemer perzh e kefridioù ar vro hervez e ampartiz."

Ar gargidi a vije tud eus ar strollad politikel; ar mennoze-se a zo estren hag awenet gant reizhioù ar mare.

5.- "Ar frankiz a gredenn a zo gwarantet da holl Vreizhiz.

"An darempredoù etre ar Stad Vrezhon hag an Iliz a vezo reizhet dre un emglev."

Talvezout a ra al lodenn-mañ eus ar skrid evit ar relijion.

6.- "Frankiz an deskadurezh a vezo adsavet. An tiez skol o labourat war gelennadurezh speredel ha broadel ar yaouankiz a chom dindan evezhierezh ar Stad. Savet e vo ar gelennadurezh "goude-skol ha micherel."

Ar mennoz-se a denn kalz d'ar sokialouriezh. Met gallout a reomp merzout e kompavez diwar-benn unan eus kudennoù pouez-usañ ur Stad diazezet : an darempredoù etre ar Stad hag an hinienn. Ur Stad ne zle ket gwaskañ an hinienn, met ne c'hell ket kennebeut plediñ gant youl pep hini. Dreist-holl goude an dispac'h e tle an hinienn bezañ kaset d'he rezid, hag er rezid hepken e c'hell en em ziorren evit gwir.

7.- "Ar yezhoù-stad a vo anezho ar brezhoneg, yezh vroadel, "hag ar galleg.

"Diazezet e vo deskadurezh an div yezh hervez ezhommoù "ha mad pobl Vreizh. Roet e vo da Vreizh un hollzeskadurezh "klok; ur skol-veur geltiek a vo krouet e Breizh-Izel."

Kejañ a reomp amañ gant kudenn ar yezh a c'hell bezañ diskoulmet dre studiañ an degouezhioù er broioù all.

Me gav din ez eo anat e kemer ur vro ar yezh a ziorren anezhi. Da skouer bremañ e Vreizh ez eomp war-du ar galleg peogwir ez eo ar galleg yezh an diorredur. Met d'an deiz ma vo eus ar Stad Vrezhon e vezimp c'hoazh en ur stad div-yezhek; hogen ar brezhoneg a gemero ar penn peogwir e vo diorreet ar vro gantañ. Gallout a reomp diouganañ da skouer e pado ar galleg muioc'h war ar maez eget er c'hêrioù.

Ur fazi a re izili ar C'huzul eta o kemer div yezh-Stad.

8.- "An tiegezh a zo anezhañ penn-danvez ar gumuniezh ha setu "perak e vo gwarezet pizh."

Ar mennoz-mañ a gaver e Frañs en hevelep mare : "Travail, Famille, Patrie".

o

10.- "Yec'hed ha buhezegzh-vat ar bobl, stourm ouzh ar vezv- "enti a vo suraet en un doare a-trish."

11.- "An douar hag ar madoù-leve, diazezet e Breizh, ne c'hell- "int bezañ perc'hennet nemet gant Breizhiz."

12.- "Pinvidigezhioù Breizh aloubet gant Wallaoued a vo dask- "oret d'ar Stad Vrezhon."

13.- "El labour emañ diazez pinvidigezh espernel ha kumuniezh "Breizh. An holl labourerion : labourerion-douar, labourerion- "kêr, tud a vor, micherourion a vo lakaet dindan warez ar "gumuniezh : labour hag ur pae dereat a vezo suraet dezho holl; "ar prizioù a vezo stabilaet; an trafikerezh-arc'hant hag an "uzurezh a vo difennet. Prizioù gounidus a vo suraet da frouezh "an douar. Pep rumm eus al labourerion en devo dileuridi e- "kichen ar Stad."

Evit sioulaet ar boblañs eo bet kinniget al lodenn-mañ eus ar skrid, a glask tennañ d'an armerzh. E gwirionez n'eus rektres armerzhel ebet. Forzh penaos, pezh a ginnigont ne c'hell talvezout e-pad ar brezel : gwall glañv eo armerzh an holl vroioù. Da gantañ eo bet kredet ez afe mat an traoù gant an Alamaned, met buan eo bet didouellet an dud.

14.- "Ar c'henwerzh hag an ijinerezh a vezo dizalc'h nemet e "rankint sujañ da ezhommoù an espererezh broadel."

Miret e vez eta ar berc'hentiezh prevez. Mat eo e pep kelennadurezh politikel reiñ resisadurioù : pezh a ranker kinnig d'an dud a zo ur framm-stad klok.

15.- "Pesketaerion ha merdeidi a gendalo'ho da dennañ o mad "eus o reoladur-bremañ, nemet e vezo gwellaet ar c'hentañ ar

"gwellañ. Ijinerezh ar pesketaerezh hag an ijinerezhioù stag
"outañ a vezo adurzhiet, e doare da suraat ur pae dereat d'ar
"besketaerion ha da labourerion an ijinerezhioù, diwar sevel
"kontradoù rannvloaziek ha kreskiñ fred an ijinerezhioù."

16.-"Kargidi vreizhat a vo dalc'het en o c'harg.

"Ar pañsionoù hag al levedoù-retred a gendalc'ho da vezañ
"paeet d'ar Vrezhoneg o deus ar gwir dezho hiziv an deiz hag
"ouzhpenn en un doare rekis e vezint reizhet."

17.- "Stagañ a vo graet diouztu da bourchas binvioù-labour
"da espernerezh Breizh ha d'he lakaat da c'hounit hervez ur
"roll-labourioù hirbad ha kaset da benn, diouzh ma vezo al
"labour-se da ober prim pe primoc'h, evel : stummañ ar c'hêrioù
"hag an embregerezhioù-dilec' diouzh un doare bremañ, sevel
"tiez d'al labourerion e kêr, adaozañ ar mereurioù war ar maez,
"digeriñ hentoù etre kêriadenoù ha kêrioù, kempenn ar porzhioù
"pesketa ha kenwerzh, toullañ mengleuzioù, krouiñ kreizennoù
"michezioù hag ijinerezhioù eus ar vro."

"Al labourerion hag ar vicherourion dilabour a vo da
"gentañ galvet da gas da benn ar roll-labourioù-se."

18.- "Amzer vak hag ehen-labour al labourerion a vezo troet
"war-du ur vuhez yac'h dre ar sportoù, ar beajoù hag an desk-
"adurezh, evit ma kavo pep unan govr e striv el levezeg veañ."

o

Ar raktres darskialour-mañ a zo e bal chom hep spontañ
an dud ha war un dro respont d'an enep bruderezh graet gant
frankiskilhoned ar mare. (Da skouer diwar-benn kudeann al levedoù)

Evit klozañ e c'hellfemp en em c'houlenn da skouer petra
a zo da ober er mare-mañ e Breizh. Daoust hag embann seurt

diskleriadur a vefe mat ? Ne gav ket din. Aze e kejjomp gant
div gudenn war un dro : hini ar bruderezh hag hini ar strollad
politikel.

Evit pezh a sell ouzh ar bruderezh ne c'hellomp nemet
kinnig un dra a bled gant ezhommoù ar boblañs. Da gentañ e
rankomp studiañ an ezhommoù-se, ha goude diazezañ ur politik-
erezh breizhat.

Dre ur strollad politikel breizhat, ne fell ket din lavar-
out ur strollad heñvel ouzh ur gostezenn c'hall : n'en defe ket
da gentañ an hevelep stumm. Ar strolladoù politikel gall ne
reont nemet ur varmouzadenn a bolitikerezh.

Ur strollad brezhon en defe endeo furm ar Stad Vrezhon
dazont. Eñ a lakaic war wel dre ar bruderezh enkadennoù ar gevre-
digezh. Seurt strollad politikel ne vo ket savet en un deiz.
Ret eo da gentañ diazezañ ar mennozioù e brezhoneg, brudañ anezho
en Emsav, hag en diwezhañ treuzfurmiñ ar gevredigezh vihan ez omp
ha reiñ dezhi ur furm stadel.

Eleze sevel ur strollad politikel a vo e roll blenian ar
bobl war-du an dispac'h.

)) o ((

Meurzh 09 Eost 1966

L E N N I G D Z H

T a n g i L O U A R N

M E A V E N N

BUHEZ MEAVENN

MEAVENN a zo anv-pluenn Fant ROZEG. Ganet eo bet e Sant Mark e-kichen Brest d'an 12 a viz Du 1911. Desket he deus brezhoneg da zaozek vloaz. Da ugent vloaz eo aet da Yrc-Iwerzhon. An amzer he deus tremenet du-hont a zo 'a-bouez bras evit kompren ul lodenn vat eus hec'h oberenn a gomz diwar-benn Iwerzhon pe Iwerzhoniz; ouzhpenn-se, eno he deus desket iwerzhoneg. Seul welloc'h a-se he deus gallet meizañ spered Iwerzhoniz. E 1935 da ugent pevar bloaz e timezas da Loeiz ANDOUARD. O chom e voe neuze e Sant-Malo hag e Brest da c'houde pa darrhas an eil brezel bed. Dimezhatoc'h e teuas da chom da Roazhon (betek 1944). Neuze e rankas divroañ. Addimeziñ a reas goude ar brezel. Tri bugel he doa bet diwar an eured kentañ.

o

OBRENN MEAVENN

Penaos eo deuet MEAVENN d'al lennegezh vrezhonek ? Setu ar pezh a lavar ABDOZEN e Istor al lennegezh vrezhonek : "Ne c'halle ur spered lemm a blac'h evel hec'h hini nemet ober he mad eus an amzer tremenet ganti en Iwerzhon e 1931."

E 1932 (miz genver) e vowl dija war wGwalarn, Iwerzhon dishual ha Skol Sant Enda. C'hwec'h miz goude, e mezheven, e vowl un dastumad istorioù berr, leun a vuhez ha flemmus alies : Ta c'hwezh svel Walarn.

E miz ebrel 1933 ez embann c'hoazh un oberenn diwar-benn Iwerzhon : Penaos emañ ar bed gant an iwerzhoneg, hag ivez un dastumad barzhonegoù anvet : Kanoù en deiz.

E 1941 e skrivas MEAVENN un danevell fromus awenet gant Iwerzhon adarre : Ar Pollez yaouank. Sur-mat emañ aze he fenn-oberenn.

A-hend-all he deus troet pe skrivet pezhioù-c'hoari. Met an holl n'int ket bet moulet. Un darn anezho a zo tremenet war wagennoù ar skingomz. Daou bezh he deus troet diwar an iwerzhoneg An Trubard hag An Ode dreinek (gant MURRAY). Ar re he deus savet hec'h-unan a zo : Bil dimeziñ e 1942, Marv er Gâr e 1943, Kimiad hag Ar Vamm e 1944.

Evit ar skingomz he doa skrivet ivez un nebeut prezegennoù a oa e gwirionez danevelloù berr : Merc'hed Brest, Nenn, Brest gwechall, Tintin Katarin, Benveziou Nenn.

Ret eo menegiñ ivez al labour kazetennerzh he deus graet war c'hGalv e-pad ar brezel (1941-1942). Ar pennadoù-se a zo sinet F.R.A. Bez e kaver : Keltia : De Valera, Moged ezafis, Bibl an Emsav, Ginivelezh un emsav. Skrivet he deus ivez un nebeut pennadoù en Arvor.

STUDI AN OBRENN

Daoust d'an holl dalbennoù meneget a-us, e chom berr a-walc'h oberenn MEAVENN rak kalz a skridoù n'o deus ket ouzhpenn div pe deir fajenn. Youenn OLIER a lavar e Frederiademnoù e sigar un nebeut skrivagneriezh vrezhonek : "Ar gredenn an eus ez eo berr-analet kalz eus hor skrivagneriezh; ne ziskouezont ket bezañ gouest da empennañ, da lakeat da zareviñ. MEAVENN eta, a zo heñvel ouzh an darn vuiañ. Skrivet he deus un oberenn dudius nemet savet a zeiz da zeiz ha na gas ket da bell en diwez, abalamour m'eo re enk."

I)-Barzhonegoù

Dastumet he deus MEAVENN he barzhonegoù e Kanoù en Deiz (Gwalarn, Niv. 53, ebrel 1933). Met kavet e vez un nebeut ivez e Barzhaz Gwalarn (Niv. 66, mae 1934) : ar re gserañ ez int sur-mat.

Berr a-walc'h eo ar barzhonegoù-se pa n'int ket berr kenañ : e Steredenn splann da skouer n'eus nemet seizh gwerenn. Ouzhpenn-se, ar gwerzennoù o-unan a zo berr ivez peurliesañ, ha dizingal o'hirder, ar pezh a ra ur varzhoniezh vev met na c'hell ket tizhout meurdezusted gwerzennoù hir hag ingal. Youenn OLIER a anv ar barzhonegoù-se "barzhonegoù munutenn". Peurliesañ e kaver neuze barzhonegoù brav, met n'eus ket tu da lavarout ez eus kalz a arz enno. An aked a vefe set da sevel anezho n'eo ket anet. Daoust da se o deus talvoudegezh, ha gellout a reer o c'havout plijus da lenn. Da skouer e c'heller kemer : Ar Glav, Al Loar, Ar Steredennig, Ar Steredenn splann, Ar Yarig, Demat, An Erc'h, h.a. Aes kenañ int da lenn.

ar barzhonegoù n'o deus ket a glotennoù, implijout a ra MEAVENN ar gensoniezh diabarzh. Tu a zo da gemer Al Loar evel skouer :

"Al loar a zeu er-maez
Eus ar goumoulenn,
Melen evel ur bolez
Al loar."

Ur gwerzennoù-mañ e vez merzet anat ar son "l", dreist-holl en div ziwezhañ. Ar gerioù "koumoulenn" ha "melen" a zo ivez e kensoniezh. Pep ger a seblant bezañ bet dibabet evit reiñ ur skeudenn vrayoc'h eus al loar.

Lavarout a ra c'hoazh Youenn OLIER ez eo alies brizhtrivlier-ezh, ha n'eo ket gwir from a gaver e barzhoniezh MEAVENN, nemet ur wech ar mare. Krediñ a rafed a-walc'h ne vefe bet savet ar gwerzennoù-se nemet evito o-unan ha n'eo ket evit ar mennozioù a zo enno.

A-wechoù marteze eo gwir, met ne zisoñj ket kennebeut Youenn OLIER ez eus barzhonegoù kaer-tre dre ar mennoz dreist-holl : bez' eus pezhioù awenet donoc'h eget Al Loar. Da skouer :
A-hed an deiz, Neuze, Krediñ raen, An Ankou, D'an hini karetañ.

En Ankou, MEAVENN a lavar deomp petra eo ar marv eviti :

"Perak o deus lakaet ur stumm spontus warnout ?
N'out ket diavalav,
N'out ket doannius,
Dianav hepken.
Un nor out
A zigor
Ar vro gevrinus a vo hon hini."

Pa ziskouez MEAVENN an Ankou evel ur boud a zo moarvat dianav hogen ivez ur boud n'eo na spontus na drouk, e venn reiñ dezhañ un dremm nevez, disheñvel diouzh hini spontus ar mojennoù.

Eviti ar marv a zo un dra ken eeun hag unan all, ha seblantout a ra e c'hertoze seder ar mare diwezhañ, ha zoken gant un tamm c'hoant da c'houzout penaos e tegouezho.

D'an hini karetañ a ziskouez trivliadoù gwirion : ur garantez don ha gwalldrus eo a zo diskuilhet eno.

Ar pezh a gaver alies ivez e skridoù MEAVENN, eo barzhonegoù eeun kenañ, graet gant an disterañ tra evel Ar Yarig pe Demat. N'eus ket kalz a labour enno, marteze peogwir he deus bet c'hoant ar skrivagnerez d'ober ur varzhoniezh eeun ha dilore'h. Diwar-benn an traoù pemdeziek e felle dezhi skrivañ, dreist-holl a-benn diskouez gwelloc'h ar vuhez evel m'emañ. Gwir eo met pep tra n'eo ket mat da vezañ lakaet en ur varzhoneg hag e-touez ar barzhonegoù eeun-se, ar re vrayañ eo ar re o deus ar mennozioù uhelañ.

An Hini Kozh hag an Hini Gozh a zo taolenn daou zen kozh didro, met ar pezh a ro ar muiañ a dalvoudegezh d'ar varzhoneg n'eo ket o buhezgezh dister : an Hini Gozh o chom er gêr da wriet ha d' ober yod, an Hini Kozh o vont da zastum keuneud evit ober tan. N'eo ket kennebeut "an nor o chourikat", met ar garantez a zo etre an div dudenn; an dra-se a zo bet estalet mat gant MEAVENN. Ur varzhoneg vat hon eus eta amañ.

Met barzhonegoù bravañ MEAVENN a zo sur-mat ar barzhonegoù arcouezel, peogwir ez eus ur mennoz don enno. Lavarout a ra Youenn OLIER : "Evel just n'eo ket a-ratozh he deus graet gant ar varzhoniezh-se muic'h eget gant eben. Emi avot he deus diskouezet ar bravañ ijin. Kavadennoù lavar kaer marzhus siltoniet gant ur c'hellusk degounus kenañ he deus graet e-barzh pezhioù evel Daou-lagad va mamm, pe An Ton (a zo da geñveriañ ouzh Ar Flammell gant Maodez GLANNDOUR)."

Er varzhoneg anvet An Tan, e tiskouez da gentañ MEAVENN un ti goullo, ur gambr c'houllo, hag er gambr un tan hepken en caled. An tan a domm ar gambr yen o lezel e dommder, met tamm ha tamm ne chom mui nemet ludu. Pellout a ra da MEAVENN bezañ an tan-se, tommañ kalon an holl dud en-dro dezhi, ha pa vo echu he buhez, neuze mervel sioul evel an tan goude bezañ roet eürusted ha tommder :

"Dezañ un tan,
Endevout ur ganenn sioul
Ur goulou tomm
Ha mervel goustañ e-kreiz va ludu."

Da gentañ gent hirder ar gwerzennoù o kemmañ a bep eil, gent ur werzenn hir evit echuiñ ha gent sonioù "u" ar ger "ludu", e kredfed klevout humanad un den o vervel sioul.

MEAVENN he deus savet barzhonegoù all e stumm An Tan. Er Barzhag e vezont kavet dreist-holl : Kreisteiz, Selaouet em eus, Soñjet em eus, Levezek kreñv.

Ar pezhioù-mañ a zo meurdeuzoc'h eget ar re all : ar gwerzennoù a zo hiroc'h ha ne roont ket an neuz da vezañ ken skañv ha ken dister. Ar c'hellusk a zo asur ha ledan. Ar frazennoù a zo hir ha lusket mat. Lidekoc'h eo ar barzhonegoù daoust ma chom boutin an tem peogwir n'eo ket ar pezh a zo diskouezet a gont, met ar stadoù ene, a zo stabil. Petra a vefe ur c'hreisteiz hep ar garantez a weler atav o treuzseniñ a-dreñv pep tra ? Pep ger a gemer neuze ur ster arbennik abalamour d'ar garantez a zo etre daou zen.

An hini arzelañ eus ar barzhonegoù-se a zo Soñjet em eus :

"Soñjet em eus, hag e oan dall e don an noz,
An noz a oa du ha don en-dro din.

N'eus ken a gomzoù skañv, frondus, diaskellet,
eus ar re a nij en-dro d'ar penn karet,
Hag a zo tener 'vel ur pok laeret,
Hag a gouezh er golon
Da neizhiañ en tommder.
N'eus ken a gomzoù skañv, frondus, diaskellet,
Evit kanañ hor c'harantez.

Chom a rin dirazout, sioul ha son en ur devel.

Ha klevout a ri laouenan laouen va c'harantez kuzh,
da darzh an deiz gwenn."

Skrivet eo ar varzhoneg-se gant gwerzennoù hir ha reoù berr hervez soñj ar skrivagnerez. Aze e weler arz MEAVENN.

Ar werzenn gentañ a zo troc'het e teir lodenn gant pevar zroad pep hini, met an eil a vez distaget en un taol. Evel-se e tiskouez da gentañ ar preder, ha goude donder an noz en-dro dezhi.

An eil luskañ a zo bravoc'h c'hoazh. Dre ar skeudenn da gentañ : ar c'homzoù a zo keñveriet ouzh bleunioù askellet, hag ar werzenn verr : "da neizhiañ en tommder" a laka da soñjal e pluennoù skañv o kouezhañ goustañdik en un neizh.

Ouzhpenn-se ez eus ar gensoniezh "sk" a ro d'ar werzenn ur skañvder souezhus evel pa c'hpignfe un tommig ar c'homzoù gent ur mouchig avel :

"N'eus Ken a gomzoù SKañv, frondus, diaSKellet."

MEAVENN n'he deus skrivet nemet un nebeut barzhonegoù. An holl n'int ket pennoberenoù evit se, met koulskoude ez eus en o zouez reoù a zo par da wellañ barzhonegoù hor yezh.

2) Kontadennoù

Savet he deus MEAVENN un toulladig kontadennoù berr hag a c'haller renkañ e daou rummad. Ur rummad kentañ a zo bet moulet war Gwalarn e 1932 dindan an anv : Pa c'hwezh avel Walarn. En dastumad-se e vez diskouezet tud eus an Emsav, pe a lavar ez int eus an Emsav. An eil rummad a zo bet moulet gant Gwalarn er bloavezhioù 1942-1943. Livañ a reont kentoc'h tud eus ar verin ha dreist-holl tud eus tro-war-droioù Brest.

An dastumad Pa c'hwezh avel Walarn a zo aes da lenn ha plijus ivez dre ar spered lemm a gaver ennañ.

ABEOZEN a lavar diwar e benn : "Setu un dornadig pennadoù flemmus alies, anezho doare kontadennoù berr pe skeudennoù prim, speredek ha didruet, tennet dicouzhañ an dud o vevañ en-dro d'unan digor he spered ... troet da varn dichipot. Menozioù sklaer a zo en he fenn ha n'eo ket avel, hogen plijet eo dreist-holl gant an traoù hag an troioù-spered espar, ha kement-se a dalvezo dezhi diwezhatoc'h pa vo aet un nebeut bloavezhioù e-biou."

D gwirionez ez eo bourrus ar c'hontadennoù bihan-se, dre ma'z int gwir bewech, re wir a-wechoù zoken. Komzet e vez enno eus tud eus an Emsav evel Roparz HEMON ha skrivagnerion all.

Ar pezh a gaver d'ius ivez eo an imor vat hag ar fent a gaver enno. Da skouer e pezhioù evel Ar Romantelourion, An-Den-a-oar-ar-brezhoneg, Ar C'had, Neb-a-garo. MEAVENN a ro deomp skeudennoù flemmus eus emsaverion pe tud a gred bezañ eus an Emsav hag a zo laosk pe na labouront ket evit ar Vro.

Ar Romantelourion a zo protred en em vod en ur c'hafedi e Paris, hag a ya da bolat d'ar banniel "Gwenn-ha-Du" e kuzh

(evit chom hep bezañ gwelet gant ar borzhierz). Leun a fiziañs ez int e dazont o bro, met ur wech dimezet ne glever mui komz en o zi eus an Emsav.

An-Den-a-oar-ar-brezhoneg a gred bezañ barrekoc'h war ar yezh eget Roparz HEMON e-unan. Ha pa fell dezhañ kas e levr da vezañ moulet (ur pezh mell levr en deus lakaet 17 vloaz da sevel, rak un den eveltañ ne c'hell ket skrivañ nebeutoc'h eget se), e vez respontet dezhañ gant Roparz HEMON ne vo ket moulet peogwir e vefe re hir da reizhañ an 300 pajenn a ya d'e ober. Febezh souezh a weler neuze war e zremm ! Sabatuet eo mik.

Ar C'had a zo skeudenn un den sonik : diskouezet e vez oc'h en em guzhat dizehan. Bus ar Strollad eo met n'en deus ket a gartenn gant eon rak ar boliserion. Amañ e oar MEAVENN lakaat da verzout ar spont a zo en den-se dreist-holl en ur implijout ar pikoù goulenmata. Da skouer : "daoust hag hemañ ne vefe ket eus ar polis ?" a c'houlenn atav pa wel un den iskis.

Neb-a-garo a zo un den all eus an Emsav, met disheñvel a-walc'h : brezhoneger dispar, skrivañ a ra e kelaouennoù pouezus e galleg, ne skriv ket e brezhoneg, hag e kav an tu da lavarout : "Gwalarn n'eo ket ken d'ius". Plijus tre eo ar pennadoù-se dre an doare ma liv ar skrivagnerez kement traig fentus dre ar munud ; an disterigoù-se eo a laka da c'hoarzhin peurliesañ.

Fent hag imor vat a zo ivez e-barzh An Oberourion, met amañ ne ra mui goap MEAVENN : daou baotr yaouank kalonek eo a zo o vont da barden ar Follgoad da werzhañ levrioù brezhonek. Den all ebet ne oa dicub evit mont. Un testeni poanuz ha fromus eus al labour graet evit Breizh a gaver amañ : "An dud a selle outañ evel m'o dije sellet ouzhañ un Alaman o werzhañ levrioù eus e vro."

Koulskoude e chom atav un tammig fent evel er frazenn-mañ :
 "Keryann a lavaras evel un den en doa graet ur gavadenn :
 "Me gav din e vefe bet gwelloc'h m'hor bije divizet ul lec'h
 evit en em adkavout an eil egile."

Un trid heñvel a-walc'h hon eus pa welomp en Ar pezh na
 c'hoarvezas morse, ur plac'h yaouank o trec'hiñ war he lent-
 egezh evit kinnig he sikour d'ar Strollad.

E pezhioù all c'hoazh ne chom mui a c'hoap tamm ebet.
 En Ar c'hentañ toull e tiskouez MEAVENN an diaesterioù an
 deus un emsaver nevez dimezet en abeg d'ar rebechoù a ra e
 wreg outañ evit e labour broadel. Kent pell marteze a zo ur
 romant bihan a garantez etre daou zen yaouank eus an Emsav.
 Ur gelennerez yaouank a zo war var koll he flas en abeg d'un
 oberenn vroadel, hag unan eus renerion yaouank an Emsav a
 ginnig dezhi dimeziñ gentañ e-lec'h klask ur plas nevez.

Ar pezhioù-se a zo plijus kenañ da lenn : ar yezh a zo
 ceun, hag ar fent a ro atav ur blijadur dispar, daoust ma oar
 ivez MEAVENN ober danevelloù donoc'h o awen.

o

An eil rummad kontadennoù avat, a zo disheñvel a-walc'h
 diouz an hini kentañ dre an tudennoù da gentañ, dibabet er
 werin kentoc'h eget en Emsav, ha d'an eil peogwir ez eus amañ
 tud wirionoc'h daoust ma kaver alies skeudennoù-lu anezho.
 Evit chom tostoc'h ouzh ar wirionez eo ez implij troiennoù
 teodyezhel evel "ar bravañ tout" met an troiennoù-se a son en
 un doare iskis en destenn. Tud eus tro-dro Brest eo a zo livet
 amañ dreist-holl, tud vev daoust dezho bezañ un tammig divoutin.

Buhez an dud-se eo, pe kentoc'h o doare da vevañ, a zo lakaet
 dirak hon daoulagad. Ne c'hoarvez peurliesañ netra souezhus,
 hogen pep den en deus ur stumm bevañ ha soñjal dezhañ, hag an
 dra-se a ro kalz a vuhez d'ar pennadoù. Treuzkredennoù ar werin
 a weler, da skouer e Tintin Katarin : lavaret e veze e oa Tintin
 Katarin sotoc'h eget ar re all dre ma oa bihanoc'h ha tevoc'h
 egeto hag ivez dre ma ne zeue ket a-benn da lakaat tud he zi-
 egezh da vamiñ outi. Kemeret e veze gant an holl evel ur c'hoar
 vihan evit-se. Un deiz he doa lavaret e oa kouezhet he gwaz er
 puñs, met an holl o doa divinet ne oa ket gwir.

An hevelep fent a zo e Merc'hed Brest. Merc'hed start o
 fenn, hag o zreid war an douar eo a zo amañ. Evito n'eus nemet
 an traoù fetis a gont : gwiskamantoù, un ti; ar peurrest n'eo
 netra. Ne blij ket dezho ober kegin peogwir eo ret adkregiñ
 bemdez. N'int ket troet tamm ebet war-du ar romantelouriezh.

E Brest ... gwechall n'eo ket disheñvel dre ar stumm :
 skeudenn ur plac'h o terc'hel un ti-krempouezh hag a zo anav-
 ezet e Brest a-bezh dre ma oar lavarout un devezh en a-raok
 an amzer a vo : pe glav pe arnev pe heol. Korout a ra MEAVENN
 an holl dud-se a vev en-dro dezhi, hag ivez ar vro hec'h-unan
 a zo disheñvel bemdez ha nevez atav gant an amzer o kenmañ
 bepred.

An eil rummad kontadennoù-se a ro deomp skeudennoù eus an
 dud hag eus gweledvaoù taolead Brest. Daoust ma'z eo brastreset
 an tudennoù, peurliesañ e chomont gwirion, ha bev kenañ dreist-
 holl.

3) Pezhioù-C'hoari

Savet he deus ivez MEAVENN pezhioù-c'hoari. Tennañ a reont kalz da gontadennoù an eil rummad, dre ma tiskouezont ar bobl gant he diaesterioù pemdeziek, ha gwechoù zo he dienez. Met n'he deus ket kroget diouzhtu da skrivañ pezhioù diouti hec'h-unan : kroget he deus da gentañ gant troidigezhioù diwar an iwerzhoneg An Trubard hag An Ode dreinek (gant MURRAY). Ma'z eo deuet da skrivañ pezhioù-c'hoari eo, evit ul lodenn vat, en abeg d'ar skingomz : he fezhioù-c'hoari a veze kaset war wagennoù Rozhon-Dreizh hag un nebeut anezho n'int bet biskoazh embannet.

An dud er pezhioù-mañ a zo gwirheñvel a-walc'h. Setu soñj Youenn OLLIER diwar o fenn :

"Amañ c'hoazh a-hend-all eo treset mat temzoù-spered an "dud-se eus ar bobl hag a zo hogos astud a-wechoù : o emzoug, "o diavaez a zo talvezet mat, dre ar yezh dreist-holl; an aer- "gelo'h kevredigezhel a zo rentet mat en hevelep doare. An "diviz a-hend-all a zo natur kenañ, digenstag a-wechoù, di- "c'hortoz, evel ma c'hoarvez e gwirionez pa gomz an dud bemdez."

An tudennoù eo a ra ar pezh-c'hoari; setu perak eo reuziek peurliesañ. Ur weledigezh dic'hoanag a-walc'h eus ar bed a vez kinniget deomp. Ne weler ket tud chalet gant un uhelvennad met er c'hontrol tud o vevañ, gwellañ ma c'hellont, evit chom hep bezañ re walleurus. Koulskoude en Ar Vamm eo un tammig dis- heñvel an degouezh : ur vamm a zo war var mervel gant ar c'hrig- bev (lavaret eo bet dezhi gant he mezeg e varvfe a-benn tri miz) neuze, dre garantez evit he merc'h, he mab hag he gwaz, en em laka da dremen evit ur vezvierenz, evit m'o dije nebeutoc'h a

boan galon pa varvo. Fromus kenañ eo gwelout ar vamm-se, oc'h en em aberzhiñ evit he ziegezh, disprizet gant he merc'h; he gwaz en deus kentoc'h un tammig truez outi. N'eus nemet he mab a gendalc'h da garout anezhi : e spered ar mab, zoken mezvierenz, e chom atav e vamm. N'eo ket gwall galonekdis evelkent ar skeud- enn-se eus ar vuhez : gwelout a reer tristedigezh ar vuhez dreist-holl. E Kimiod e lavar Mari : "Savet omp holl evit ul labour ki bennak, ul labour ki chadennet, hag ur pafision da dri-ugent", pe c'hoazh : "bevet hon eus evel loened mat". En Eil dimezi eo stad dices merc'hed ar werin a zo diskouezet, a-wechoù o labourat kalet gant ur gwaz mezvier a zistro d'an noz d'ober reuz en ti. Bevañ a reont well-wazh evit desevel o bugale.

Ur rebech a vefe koulskoude d'ober d'ar c'hoariva-se : re enk eo. Peurliesañ ne c'hoarvez netra nemet un darvoud a ro e ster d'ar pezh. A-hend-all n'eo nemet divizoù a-zivout ar vuhez pemdeziek. En Eil dimezi eo ar gwaz a zistro a-daol-trumm pa veze kredet marv, dres a-raok ma timezfe e wreg gant ur paotr all. Met mervel a ra en ur zegouezhout er gêr. Un tammig souezh- us eo an diastro-se, hag ivez ar marv ken trumm. Kimiod a echu re vuan : pa wel lan ar plac'h a gare etre divrec'h e vreur e lavar dezho mont kuit o-daou raktal, hep zoken goulenn displeg- adennoù.

Pezhioù-c'hoari MEAVENN a ziskouez ete buhez pemdeziek tudennoù chalet alies gant ar pezh a vo o stad en deiz goude; bevañ a reont e trubuilhoù a bep seurt. An hini gwellañ eus ar pezhioù-se a zo sur-mat Ar Vamm, dre livadur an tudennoù ha dre ar mennoz a zo enañ. Met koulskoude eo re verr seurt pezhioù- c'hoari evit ober ur c'hoariva bras.

4) Ar Follez Yaouank

Ar Follez yaouank a zo an danevell hirañ he deus skrivet MEAVENN ha dollezek eo da gaout ul lec'h a-ziforc'h en hec'h oberenn; ugent div bajennad a ya d'hec'h ober war wGwalarn. Kontañ e ra istor un Iwerzhonadez yaouank anvet Enda, ha tonket da lazhañ un den eus an Emsav ma estlamme outañ.

Kregiñ a ra an danevell en un ti-diskuiñhañ : gwelout a reer Enda skuizh ha dinerzh, o klask skrivañ hec'h eñvorennoù. Neuze e adweler dre he soñjoù ar pezh a zo c'hoarvezet ganti abaoe he bugaleaj. Pa oa bugel c'hoazh e oa Enda o chom gant he breur Kevin hag he c'herent en un ti war ar maez, pell diouzh pep tra ha pell diouzh pep den. Ar vamm a varv abred, skuizhet gant an trubuilhoù hag an aon rak ur gwaz mezhvier. Pa zistro ar gwaz d'ar gêr eo evit skeiñ war e vugale.

Dano'houde e varv ivez an tad. Enda ha Kevin a vez kemeret e karg gant un contr bennak a zalc'h ur c'henwerzh bihan er gêr amezek, "Galiv". Enda a chom a-hed an devezh da werzhañ marc'hadourezh da dud ar vourc'h. Kevin en deus bet ur yalc'had studi a chom a-hed ar bloavezh-skol da studiañ e Dulenn. Eno e kej gant tud eus an Emsav hag en em laka evelto da stourm evit Iwerzhon. Pa zistro Kevin d'ar gêr evit an ehanou, e kemer e c'hoar gantañ evit ober labour emsaverzh. Met un deiz e vezont tapet gant ar bolis. Enda a vez kaset en ur gouent ha Kevin a vez toullbac'het ur pennad.

Hogen a-benn nebeut ne glev mui Enda komz eus he breur. En em c'houlenn a ra petra eo deuet da vezañ. Mont a ra dre guzh da laerezh kelaouennoù e ti ar renerez, hag e lenn war unan anezho eo bet lazhet he breur ha taolet e gorf en ur stêr. N'he deus mui neuze nemet ur mennoz : tec'hout kuit eus ar

gouent evit mont da zialañ anezhañ. Dont a ra a-benn da vont kuit eus ar gouent hag ez a da zDulenn gant ar c'hoant da lazhañ maodiern ar barnerezh. Eno e kej gant ur paotr yaouank anvet Jim Ryan. Kinnig a ra dezhi pignat en e garr-tan evit mont da vale ha komz diwar-benn he breur, met he zouellañ a ra hag e tegas anezhi en-dro d'ar gouent hep ma oufe. Enda a zeu a-benn da dec'hout un eil gwech met adkavout a ra c'hoazh Jim Ryan war hec'h hent. E saveteiñ a ra pa'z eo heskinet gant ar bolis en ur guzhat anezhañ. Met homañ a lavar dezhi eo eñ en deus lazhet Kevin war urzh ar c'huzul. Enda, pennfollet, a laz anezhañ.

En dibenn ez adkaver Enda en ti-diskuiñhañ. Sioulset eo bremañ war-lerc'h ar barrad he deus bet : "En fann e oa trouz ur feunteun", a lavar, "c'hwez ar fenol gant an aer en-dro din."

En danevell-mañ ez eo kaset an istor betek an disoc'h gant c'hoari an tudennoù nemetken. Enda ne c'helle ket echuiñ en un doare all, o vezañ ar spered he doa.

An tudennoù a zo livet mat-tre : da gentañ an dud en Iwerzhon. Da skouer, contr Enda en doa kemeret ar vugale gantañ peogwir ne c'helle ket ober a-hend-all; met implijout a ra Enda en e genwerzh. N'eo ket un den gwall zrouk met un den eeun a-walc'h diwar ar maez en deus c'hoant en em zigoll. Ne weler ket kalz mamm Enda, met mervout a reer ez eo ur vaouez a zo bet gwall-ec'rus a-hed he buhez dreist-holl gant he gwaz. Merv eo gant ar glac'har hag ar skuizhder. Lavarout a ra dizehan : "Ha kiriek on ? ha kiriek on ?" Kevin a zo un tammig evel e c'hoar. Entenet eo gant an Emsav, met n'eo ket kempouezet-mat kennebeut e spered. An tad a zo livet evel ur paour-kaezh den distabil ha mezhvier ouzhpenn-se. Spontañ a ra e wreg hag e vugale, he dont a ra da

vezañ droukoc'h c'hoazh en ur goshaat. Evit diskouez petore den eo e vefe diaes kavout gwelloc'h eget ar pezh a lavar Enda hec'h-unan : "un den en dije ranket mervel da 30 vloaz". E nervernoù a zo kizidik kenañ : p'en em laka Kevin da leñvañ eo ken hegaset ma fell dezhañ skeiñ warnañ evit reiñ dezhañ un abeg da leñvañ; ha neuze Enda en em daol dirazañ evit mirout outañ a skeiñ.

En ur seurt aergelc'h n'eo ket souezh e vefe digempouez Enda, dreist-holl pa cuezzer e oa foll he zad-kozh ha tud all eus he ziegezh : gwallreuz an hererezh eo a vez diskouezet amañ. Ar vuhez a ren Enda n'eo ket evit gwellaat he stad : dilezet eo gant hec'h contr er c'henwerzh hag an dud a glask abeg enni evit ar fazioù a ra en he jedadennoù. N'he deus netra eus ar pezh a zo ret d'ur bugel evit dont da vezañ un den reizh : na kerantez ar geront (ar vamm a zo marv re abred), na zoken tud all evit kompren anezhi hag he sikour p'he devez ezhomm. Hec'h-unan-penn e chom atav, serret warni hec'h-unan, dreist-holl p'emañ he breur o studiañ e Dulenn. Er gouent ivez eo dilezet : sellet e vez outi evel ouzh un dorfedourez. Pennos, hi ha na oa ket gwall yac'h dija dre an hererezh, he dije gallet bezañ ur vaouez reizh ? Dic'hallus e oa. MEAVENN he deus gallet lakaat al lenner da santout en un doare lemm an aergelc'h ma vev Enda.

Gwelout a rver anezhi o trelatiñ tamm-ha-tamm : da gentañ ne daol ket pled ouzh pezh a ra : ober a ra fazioù en he c'hontoù. Goude-se, heuget gant an diwegañs a ziskouez an dud en he c'heñver e huñvre emañ o vont da vro Amerika hag e tistro un nebeut bloavezhioù goude gant ur c'harr-ten bras a laka an dud da estlamiñ outi ha da vezañ gwarizius. Dont a

ra tre ivez en Emsav broadel peogwir e kav ez eo un tu mat evit prouañ ez eo dreist d'ar re all. Hag en dibenn, a-rack lazhañ Jim Ryan, ne c'hell mui stourm outi hec'h-unan : "A-greiz-holl ne welis mui nemet ur skeud gant divrec'h vras". Divezhatoc'h pa zeu er-maez eus he barred follentez en em ad-kav e ti ar re sot. Trouz ar feunteun en he fenn a ziskouez eo sioulaet : ur vuhez nevez a adkrog marteze eviti, met ret e vo dezhi bezañ prederiet mat, ha teurel evezh da chom hep skuizhañ : "N'em eus kroget da vevañ adarre nemet evel ma tihuner en noz du". Micher ar skrivagnerez a vez gwelet dre seurt frazennoù, rak reiñ a reont da santout an aergelc'h pouner e-lec'h ma vev an tudennoù. Evit ma tessonfe en un doare gwirionoc'h c'hoazh he deus implijet ar c'hentañ gour a-hed ar pennad : bac'hoc'h a-se e seblant bezañ. An hevelep pal a zo tizhet dre ar frazennoù berr hag eeun ha dre ar gerioù na livont nag an dud nag ar vro, met an trivliedoù a zo e pep hini.

A-wechoù zoken e vefe kredet a-walc'h eo he mennozh dezhi hec'h-unan he deus c'hoant ar skrivagnerez lakaat da dremen. Da skouer : "Me gav din eo ret bezañ foll er vuhez. En em reiñ d'un dra bennak; ket d'un den bennak. D'un dra bennak". Aze, ur wech ouzhpenn e tiskouez MEAVENN ez anavez mat spered an den.

An danevell-mañ a zo en hini hirañ bet skrivet gant MEAVENN, met ivez, sur a-walc'h, an hini wellañ. Studiet eo bet mat an tudennoù ganti hag an doare reuziek ma vez diskouezet an darvoudoù. Ar yezh a zo eeun hag an istor a zo bourrus da lenn. Prouiñ a ra amañ MEAVENN e oa enni danvez ur romanteloures vras.

5) Pennadoù a gazetennerezh

Pennadoù gazetennerezh he deus skrivet ivez MEAVENN e Galy e-pad ar brezel, e Swalarn hag ivez en Arvor. Pennadoù o komz diwar-benn an Emsav dre vras e Breizh hag en Iwerzhon; pennadoù all fentus a-wechoù diwar-benn a bep seurt traoù.

A-zivout an Emsav breizhat ez eus pennadoù evel Fibl an Emsav ha Ginivelezh un emsav. O bar a ra aze ur c'hrennad eus ar pezh a zo bet graet en Emsav abaoe un nebeut bloavezhioù. Diskouez a ra penaos e teu ar mennoz broadel emomp, evel ur boud. Komz a ra eus labour "Skol Ober" hag ar gelaouenn Ober. An Emsav iwerzhonek a vez studiet ivez hir a-walc'h ganti en Iwerzhon dishual, Skol Sant Enda, Penaos emañ ar bed gant an iwerzhoneg. Dre bennadoù evel-se eo ez anavezomp alies stad Bro-Iwerzhon. Lakaet a reont splann pegen diaes eo reiñ ur mennoz broadel da Iwerzhoniz. N'eus nemet un toullad tud hag a zo gwir Iwerzhoniz. Kalz a gav gwelloc'h ar saozneg eget an iwerzhoneg evit daou abeg peurliesañ, a adkaver ivez e Breizh : an iwerzhoneg n'eo ket ur yezh kenwerzhel, ha n'eo mat nemet evit ar gouerion. Ouzhpenn-se, darn a lavar eo re ziaes da zeskiñ. Reiñ a ra keloù eus ar "Gaeltacht", "An Fainne" hag eus an tabut etre ar skolioù iwerzhonek hag ar skolioù saoznek.

A-hend-all, en ur pennad fentus, e c'houlenn digant ar re yaouank skrivañ e brezhoneg, hag a ra goep ouzh ar vrezhonegerion a-vihanik a lavar atav gouzout gwelloc'h ar yezh eget ar re all, met na skrivont netra (loged saais); lavarout a ra eo dispar levr Sean O'FAOLAIN diwar-benn de VALERA, hag e komz eus dibab ur banniel evit Bro-Iwerzhon.

Ar pennadoù-se ne oa ket o fal bezañ lennegezh uhel met koulskoude ur pennad evel Penaos emañ ar bed gant an iwerzhoneg a zo ur studiedenn blijus. Xeleier a ro MEAVENN eno, un tammig evel ma ra Ar Bed Keltiek bremañ.

6) K l o z a d u r

Danvez ur skrivagnerez vras a oa e MEAVENN, rak meur a hini eus he danevelloù, pe eus he fezhioù-c'hoari, o dije gallet kaout kalz muioù-ha dalvoudegezh ma vijent bet hiroc'h. Dre vras, siwazh, eo re enk hec'h oberenn. Daoust da se he deus ur yezh eeun kenañ, ha plijus eo da lenn. He fluenn ken lemm hag he spered a ro kalz a vuhez d'ar pezh a skriv, ha sur-mat e chomo un nebeut eus he skridoù el lennegezh vrezhonek.

)) o ((

Sadorn 13 Bost 1966

L E N N E G E Z H

a b E N N E Z

A N K E N A N N I B E L U N G E N (Y.-V. HENEU)

Warlene hon eus bet tro c'hoazh da ober ur gentel war ur pennad tennet eus oberoù an Ao. HENEU. Ne vo ket fall neozh da'm menz komz adarre a-zivout oberoù ha buhez ar skrivagner-mañ, kent studiañ a-zevri ur pennad all digantañ.

Buhez :

Genidik eus Neizin (1869), en tu all da Bontivi, e voe tro-ha-tro kure e Flouizhineg, Flouzoue, Berrig ha Person e Noaloù hag e Lanvodan; Eno e varvas e 1929. Skrivet en deus ur bern pennadoù e Dihunamb dreist-holl hag ivez e Brittia hag e Kloc'hdi Breiz.

Degaset en deus d'al lennegezh ur bern levrioù a bep doare. Ur yezh dreist a oa gantañ; setu pezh a lavar ABCOLE an e Istor al Lennegezh war he divout : "Pinvidik-dreist eo e vrezh-
oneg ha nerzhus, diaes da lenn alies, ken puilh eo e c'heriadur,

hogen dedennus-tre ivez en abeg da se !

Goude e varv eo e voe embannet e levrioù, e-giz stagadenn lennegel da zDihunamb. Lezet en doa e holl zarvez da Loeiz HERRIEU evit embann levrioù brezhonek.

Sed amañ roll e oberennoù pennañ :

- Mab Azen - Ribardernoù - Bourrapted an Tiegezh; levrioù kontadennoù evel ma veze klevet stank gant ar bobl. Moarvat eo bet ar re-se klevet gant an oberour e-unan, hogen adveret int bet gantañ en ur brezhonog ampart ha plijus.
 - Levrioù relijiel pe damrelijiel evel Sant Koulmkell (buhez ar sant iwerzhonat hag un nebeut sent all eus Keltia) - Ar Graal Santel, levr burzhudus diwar Sakramant an Aoter, ur pezh mell levr, ennañ tost da 500 pajenn, hon doa tennet ur pennad dioutañ warlene.
 - Adaozadurioù diwar lennegezh Iwerzhon : Derriù, ha Gweladenn Tondal (lakaet e brezhoneg diwar ar skrid savet gant I. an DIBERDER).
 - Istor Breizh pe Hanez ar Vretoned zo bet savet gantañ ivez, e kenlabour gant Loeiz HERRIEU ha skrivagnerion all Dihunamb.
- Un dousennad bennek a bikol kaieradoù dornskrivet a chomfe c'hoazh war e lerc'h, gouez da Loeiz HERRIEU. Mat e ve gouzout petra int deuet da vezañ evit embann ar pep gwellañ anezhe, a c'hoarvezfe, diouzh an eus klevet, gant troidigezhioù.
- Un droidigezh eo ivez al levr all hon eus tennet ur pennad dioutañ da studiañ hiziv. ANKEN AN NIBELUNGEN, "tennet a lennegezh kozh Germania". Ul levrig n'eo ken (nemet ha ne vefe

ket bet embannet en e bezh ?), ennañ 60 pajenn hepmuiken. Un Tafiva a vo roet deoc'h gant ar pennad emacomp o vont da studiañ. Evel-se e wellfet petore yezh a oa gant an Ac. HENNEU. Ur roll gerioù "nebeut anavezet" zo e dibenn al levr, ur 60 bennak anezhe. Reoù anezhe zo anavezet mat er yezh lennegel, evel "glann" ha "gouron" a vo gwelet emberr. Reoù all avat, daoust ma'z int anavezet mat e kornioù zo a Vro-Ereg n'int ket bet arveret kalz c'hoazh er yezh lennegel, evel ar re-mañ :

- amalek : tefival, trist.
- diaskat : yac'h ha kreff.
- iverañ : gloazañ gant ul laonenn bennak.
- ivin eo : kasaus eo...
- morloc'h : digoraj, digorded.

Ur raskrid gant Loeiz HERRIEU zo e derou al levr, evit kinnig an oberenn. Sed amañ an dibenn anezhañ :

"Ouzh o zreiñ (an Nibelungen) e brezhoneg, en deus an Ac. HENNEU mennet lakaat edan daoulagad Breizhiz yacuank un tamm a lennegezh kadarn pobloù ar C'hreisnoz, ken dishañval diouzh hini dinerzhet Roma gozh a reer dezhe karout e-pad o studi."

ANKEN AN NIBELUNGEN

Tennet a lennegezh kozh

Germania

ha

lakaet e brezhoneg

gant

Y.-V. HENEU

(an Oriant, Mouladennoù "DIHUNAMB", 1939)

I

SIEGFRIED

En amzer-hont e kreske, e rouantelezh an Niderland, mah ur roue galloudek. Anvet e oa e dad Sigemund hag e vamm Sigelind. O zri e choment en ur c'hastell som ha brudet, savet war c'hlanoù ar Roen. Anv ar c'hastell a oa Santen.

Ret eo din divizout deoc'h diwar braventez korf hor gouron. Ne oa ket warnañ un tachad da wallaozñ gant gouli erbet. Deuet eo bet e nerzh da vout som hag e vrud da vout bras. Kaeret eo bet ar gloar emañ bet o tolpañ war e anv !

Siegfried a veze graet ag ar marc'hag ampart-mañ. Paot a rouantelezhioù emañ bet o vonet treuz didreuz dezhe, harpet war nerzh e galon dizouj. O ! dibaret ar varc'heion dibi emañ bet o kavout e rouantelezh ar Vurgonded !

Gallout a reer brudañ e-leizh a voliac'hoù a yaouankiz Siegfried hag a vleziñ e ampartiz vleuñvet. Na kaer eo ar brud en deus grommet e anv ! Na kaer e oa braventez e gorf !

Gant an evezh perveshañ emañ bet desavet. Kalz ag e vrud zo deuet ivez a c'halloud e spered hag a nerzh e galon. Braventez dibar e vrud zo bet o kaeraat rouantelezh e dad !

Ha setu emañ bet e dad Sigemund o kas ar gemenn d'e vrezel-erion garet hag a c'hoantae ober ur banvez bras. Ag ur rouantelezh d'un arall emañ bet strewet an doare. Da bep brezelour e tonezone Sigemund ur marc'h hag ur gwiskamant kaer meurbet.

Paot a draoù a vefe gallet displegañ a-zivout deverrañsoù

laouen ar banvez. Sigemund ha Sigelind na rejont ket an traoù a hanter; e largantez ne lavaran ket. Bras ha kaer eo bet o donezonoù. Bras eo bet niver ar varc'heion deuet da zeverrañsoù ar banvez.

Pevar c'hant den yaouank a ranke bout marc'heget war un dro gant Siegfried. Bras eo bet niver ar marc'hed gwerc'h a zo bet war-dro dilhad ar varc'heion evit darampontañ bragerizoù warne.

Da galon an hañv emañ marc'heget Siegfried. En arbenn a gement-se ez eus kanaet un ofereñ en enor da Zoue. Ul lazad bras a sellerion zo bet deuet da welout marc'hegañ ar vrezel-erion yaouank. Ken kaer eo bet lidoù ar marc'hegerezh evel ma nend eo ket mui tu da hini gwelout lidoù hañval.

Deuet eo bet ar sellerion a-red e-tal ar marc'hed dibret. Hag e porzh ar c'hastell emañ bet ar varc'heion o c'houren gant kement a ampartiz ma horose ar c'hastell war e ziazez. Spontus e oa trouz o c'hlezeataerezh.

Diforc'het e veze taolioù ar varc'heion duac'h diouz taolioù ar re diakoursetoc'h, ha tarzherezh ar goarioù drailhet a zassone uheloc'h eget ar c'houmoul. Bout e oa darnoù kleze hag a strimpe tre betek ar c'hastell. Taer e oa gourenoù ar varc'heion.

Gourc'hemenn a ra ar roue dihanañ ar gourenoù. Degas a reer ar roñseed d'ar marchosi. Chom a ra strewet war ar bratell paot a skoedoù tev ha drailhet, paot a vragerizoù disgwriet strewet du-hont ha du-mañ, e-tal darnoù klezeier.

Hag ar roue Sigemund a ro d'e vab Siegfried e veli a roue war gêrioù ha douareier e rouantelezh. Reia a ra donezonoù a largentez d'ar varc'heion ha levenez vras zo gant ar re-mañ d'ao devout deuet d'ar gouelioù.

Seizh deiz diouztu emañ bet kendalc'het da vanvezañ. Ha Sigelind, ar rouanez pinvidik, he deus rannet acur ruz en enor d'he mab; rak mennout a rae gonit dezhañ kalonoù holl ar re bedet.

oooo

GERIOU :

Gwelomp da gentañ un nebeut gerioù gwenedek dreist-holl :

dibi : ampart ha prim; kv. ar verb "dibiañ" = mont buan. Ar ger-mañ a veze arveret stank gant an ao. HENNEU. Skrivet e vez a-wezhioù, gant an hevelep oberour zoken, "dibilhañ". N'em eus-me avat klevet met ar stumm "dibiañ". A-hend-all e vez anavezet e BrE. koulz hag er yezh unvan evelreizh gerioù all kenster : difraecñ, hastañ, deouiñ (hemañ o vezañ distaget /diujep/ gant ur /j/ evel e krennvrezhoneg hag e gerioù all evel touiñ /tujep/, stouiñ /ftujep/...) - ouzh hemañ eo mat tostaat an anv-gwan kevelep a gaver e krBr. deouat - hag ivez mont buan, ober buan, kas buan, mont fonnus (pe : fonnapl); diforc'hik eo ar verb "fonnaat"

fonnaat : dont a-benn da ober un dra bennak, dreist-holl en tu-nac'hañ : ne fonn ket din henn ober, ne fonn ket ouzh henn ober : ne deuan ket a-benn d'henn ober. Eh hevelep ster, e vez arveret fonnañ, ober fonn, en devout fonn. Un nebeut troioù-lavar a gaver gant "Fonn" :

avaloù zo a-fonn hevlene : paot, kalz-kalz zo...

douar fonnus : douar struzhus, douar frouezhus

fonnadur an douar : struzhusted, frouezhusted.

moliac'h : zo un danevell varzhus, evel ma veze stank er Grenn-Amzer, da skouer Romantoù an Daol Grenn zo moliac'hoù evit Gwenediz. Troioù-lavar : ur moliac'h eo : ur gwir vuzhud eo (isklevet : mar deo gwir). A-wezhioù evel-se e c'hell bezañ un elfenn a zouetañs en arver ar ger "moliac'h" ken e lavarer "moliac'her" eus unan a gont troioù c'hoarvezet dezhañ ha n'hellont ket bezañ gwir; an anv-gwan "moliac'hus" a dalvez

evel-se marzhus ha war un dro e talvez da zoareañ un den a gont istorioù diwir pe an istorioù diwir-se o-unan.

blez : ur furn wirion eo ar ger "blez" /ble/ arveret e BrE. An Ao. Fleuriot en deus adkavet an hBr. bliq, hended d'ar gwenedeg "blez"; disheñvel eo diouzh "bloaz" a zo ur furn all, ha diouzh blizen, nebeut arveret e brezhoneg-bremañ. Menegomp gerioù deveret : bleziad /blead/ ha blevezh (arveret e Foar Veriadeg).

doare : en deus amañ ur ster diforc'hik, eleze nevezinti, kelod.

largantez : brokusted; ger deveret : largantezus : brokus.

deverrañs : diduelloù; savet eo ar ger-mañ diwar ar verb : "deverrañ", c'hoari, en em zihuediñ, lakaat berr an amzer.

darampontañ : gwriet un dra bennak war an dilhad; n'oufen ket lavaret a-behan e teu ar ger-mañ ha n'emañ ket nag er GIB nag e geriadur bras Vallée a gement a ouzon (a vefe forzh penaos da dreññ gant "appliquer" e galleg).

(Marteze eo savet ar ger-mañ gant ar rakgerioù dar- hag em- hag ur ger all bennak pe "pont" pe ur ger a vefe da dostaat ouzh Kb. pywtho, krafañ, gwriet ?)

bragerizoù : fichadurioù; traoù lakaet war an dilhad (pe war ar c'horf) evit o fichañ, o c'hinklañ. kv. ar verb bragal, fougeal.

marc'hegañ : ober unan bennak marc'heg. Un diforc'h a laka an Ao. Hened etre marc'hegezh, mont war varc'h, a vez kavet ivez gentañ, ha marc'hegañ, lakaat da varc'heg.

en arbenn a : en abeg eus, en askont eus, abalamour da. Arabat

meskañ an dro-lavar "en arbenn a" pe "en arbenn eus" gant an hini "en arbenn da"; mont en arbenn da unan bennak zo mont da gejañ outañ; lavaret e vez ivez : mont a-benn da unan bennak, pe wax-arbenn unan bennak; arbennañ, diambroug, pe mont da ziambroug a lavarer ivez; diarbennañ pe mont da ziarbenn. Diarbennañ zo amsteriek e gwirionez, pa dalvez ivez kemer e ziartennoù, e zivalloù, en em eveshaat ouzh un dra bennak.

lazad : amañ e talvez ar ger evel e genster "laz" a gaver e "laz-kanañ". Ur ger all evel-se, pe marteze an hevelep hini ? a gaver skrivet "lajad" peurliesañ, da ster dezhañ "prantad, maread, koulzad"...

horose : eus ar verb horosat : hejal, horellañ, hag evel amañ, krenañ war e ziazez (kastell).

duac'h : evel al liester dozhion, arveret a-wezhioù er ster "ar Re Fur", e teu ar gwenedeg "duac'h" e ster "gourdon, ampart" eus al latin "doctus". N'ouzon ket hag-eñ e ve mat en skouer-iekaat "dozh" ivez, daoust ma ve reishoc'h.

diakourset : amañ n'hon eus ket kredet skoueriekaat ar ger. Ar verb "diakourset" zo bet savet diwar "kours", furm wenedek evit "koulz", deuet moarvat eus ur c'hemmeskaj diwar ar galleg "cours" hag ar brezhoneg "koulz" - ar rakger di- (kontrol da) hag ur meni rakger a gaver gant araogennoù zo e BrE. a zo evit gwir an araogenn c'hallek "a". Anat eo enta n'eo met un tref-oadach ar ger "diakourset". Pa vo dav ober gant ur ger evel-se e c'hell bezañ graet marteze gant "koulsaad", "digoulsaad" na mui na maes.

Strimpe : eus ar verb "strimpañ". N'eo met ur furm all da

"strimpañ". An daouad K/P zo anavezet mat e brezhoneg (kv. takenn /tapenn - felpenn/jelkenn, hag e gwenedeg skontañ/spontañ).

dihanañ : ur furm all da "ehanañ" eo moarvat ar ger-se (gant ar rakger di- pe de- marteze). Dihanañ gant pe dihanañ al labour a c'heller lavarout. Merkañ ivez an dro-lavar : bout a-sihan gant un dra bennak, bezañ dihanet, ehanet gant un dra bennak.

o devout : marteze ez eus ur fazi amañ evit "da vout" (?). Mat eo avat gouzout ne reer ket o BrE. gant "kaout" evel anv-verb o vont gant "em eus", h.a. Peurliesañ e reer gant "en devout" en trede gour, savet diwar bout; ar furm-mañ zo anavezet madik a-walo'h er yezh lennegel. Furmoù all zo avat o vont gant pep gour :

'm bout (em bout - am bout)

'z pout

en devout

he devout

hor bout

ho pout

o devout

Bezet un nebeut skouerioù :

Goude o devout echuet o labour : goude dezhe bezañ echuet o labour;

ret e ve din armerzh ervat an amzer evit ma'm bout goar da lavarout va fedennoù da noz (Magasin Spirituel, p. 376, 5) (rekis eo...) en devout kas ouzh pep seurt pec'hed (l. m. p. 372, 14)

kastizet e vlot evit ho pout graet kement-se...

holl ar re : e BrE. e vezer tachet da lakaat holl dirak ar ger

mell. Holl an dud = an holl dud; holl va zraoù : va holl zraoù.
Gerioù all a dalvez ivez e-lec'h holl : razh, bloc'h (razh an
dud, bloc'h an traoù...)

Gwelet hon eus betek-henn ar gerioù nebeutoc'h anavezet
e yezh an holl, eleze gerioù gwenedek pergen. Ez' ez eus avat
er pennad-mañ gerioù n'int ket anavezet e teodyezhoù Bro-Ereg;
dre-se moarvat e c'hell bezañ lavaret eo lennegel yezh an Ao.

HENNEU :

glannoù : ribl, bordenn an hini eo a vez lavaret gant ar bobl;
bravoc'h avat ar ger keltiek "glann" a gaver alies en arver
gant an Ao. HENNEU.

gouron : amañ e oa disheñvel ar gudenn, pa oa dianav un hevelep
anv gant ar bobl, e Bro-Ereg da vihanañ.

dibar : pa lavar ar bobl "hep par" hepmuiken.

koumoul : anavezet e teodyezhoù zo a Vro-Ereg. Feurliesañ e
reer gant ur ger all : korus. Menegiñ a c'hellomp ur ger gwen-
edek all : kenibl.

YEZHADUR :

E-keñver yezhadur ez eus meur a dra da welout. Merzhet
eo moarvat an arver stank ha fazius e-keñver ar yezh lennegel
eus "emañ" ; en ur skouerlekaat ar pennad, n'hon eus ket
kredet skarzhañ kuit hevelep diforc'hioù yezhadurel. Goude
holl, ne gav ket din ez eo gwashoc'h fazi hemañ eget ar renad-
ennoù-verb degaset gant "a" e KLT (da skouer : gwelet em eus
anezhañ, a ve meizet e BrE. evel "un tamm anezhañ").

kaeret/diberet : d'an derez estlammañ hon eus miret stumm

BrE. (ha krBr.) a zo splannoc'h a gav dimp eget hini ar KLT
-at. Ar stumm en -at a c'hell bezañ mesket gant dibenn an anv-
gwan.

nend eo : ar stumm kozh, en arver bepred e BrE. hon eus miret
ivez amañ, e-lec'h n'eo, pe BrT. ned eo, nen eo.

)) o ((

TAOLENN

LENNEGEZH abENNED	P
"Barzhoniezh Ropozh AR MASSON".....	5
ISTOR	
Mari-Elon MAZE	
"An Emsav savnadurel abaoe an eil brezel-bed".....	13
LENNEGEZH	
Gab CHEREL	
"Gwerzacuerezh Maodez GIANNIDOUR".....	19
ISTOR	
Ronan JOLAIS	
"Brezel diabarzh Iwerzhon".....	39
ISTOR	
GWERNEGAN	
"An darvoudoù etre an eskizion hag an Emsav abaoe 1920..	53
ISTOR	
Youn COURVES	
"Kuzul broadel Breizh, diskleriadur Pondivi".....	67
LENNEGEZH	
Tanqi LOUARN	
"MEAVENN".....	79
LENNEGEZH	
abENNED	
"Anken an Nibelungen: Y.V. HENNU".....	99

mmmm	mmmm	mmmmmm	mmmm	mmmmmm	mmmm
mm m	mm m	mm	mm m	mm	mm m
mm m	mm m	mm	mm m	mm	mm m
mm m	mm m	mm	mm m	mm	mm m
mm m	mm m	mm	mm m	mm	mm m
mmmm	mmmm	mmmm	mm m	mmmm	mmmm
mm m	mm m	mm	mm m	mm	mm m
mm m	mm m	mm	mm m	mm	mm m
mm	mm m	mmmmmm	mmmm	mmmm	mm m

Koumanant 12 niverenn 45 FF

Koumanant d'ar Geriadur Istorel
 Hepken (4 niverenn) 15 FF

Koumanant hep ar Geriadur Istorel (8 niverenn)..... 30 FF

Rener : G. ETIENNE

Embannerez : P. KERMOAL

Sekretouriezh : Preder , 30 Place des Lices , 35 - Rennes

An arc'hant da : M. G. ETIENNE , CCP 16 093 13 , Paris

Pevare Trimiziad 1967

Priz ar c'haier-mañ 13,50 FF

